

AR BIBL SANTEL

LEVR

AR FURNEZ

TROIDIGEFH

gant

M. Glanndour

1955

FONDS PICHAVAN


083483
AR BIBL SANTEL

LEVR
AR FURNEZ

TROIDIGEZH
gant
M. Glanndour

FB
220.
591
68
BIB

1955



NIHIL OBSTAT,

Sant Brieg, 19 a viz Meurzh 1953
Erwan Brochen,
Vikel Vras.

IMPRIMATUR,

Sant Brieg, 19 a viz Meurzh 1953
Armand,
Eskob Sant Brieg.

Diocèse de
Quimper & Léon
Évêché de Quimper & Léon

Document numérisé en 2016

Diocèse de Quimper & Léon

Levr ar Farn Furnez
+ + + + +

Al lev-r-mañ evel ar pevar lev-r all a furnez, a zo
bet lakaet dindan an-~~ha~~ paeroniezh Salomon ; met
amañ c'hoazh ned eo an dra-se nemet un ijinadenn len-
negel.

DIGORADUR

An oberour

Al lev-r-mañ evel ar pevar lev-r all a furnez, a zo
bet lakaet dindan an-~~ha~~ paeroniezh Salomon ; met
amañ c'hoazh ned eo an dra-se nemet un ijinadenn len-
negel.

Yezh an oberenn eo ar gresianeg, ha tro ar frazen-
noù gwevn hag aes, puilhder ar gerioù kevrennek a zis-
kouez un den desket-mat war ar gresianeg lennegel. Si-
wazh, n'heller ket resisaat muioc'h : n'anavezomp ket
ano an oberour, ha ne vo ket tu d'hen dizoleiñ.

Hep re a ziaesamant e weler koulskoude eo an Ejipt,
ha moarvat Aleksandria, al lec'h ma chome ennañ hor
skrivagner : e breder da bouezañ war darvoudoù an Er-
maeziadeg, e daeroni da ziarbenn al loenazeulerezh -
lorgnez kozh traonienn an Nil - hen diskouez anat-kaen.

Gant surentez awalc'h e c'heller ivez merkañ ar
prantad m'eo bet savet Lev-r ar Furnez. O vezañ ma'n em

servij hon oberour eus troidigezh c'hresianek ar Bibl (hini an 70) - ha n'eo ket bet echuet kent eget penn-kentañ an trede kantved araok hor Salver - hon eus ar gwir da lavaret eo bet skrivet ar Furnez goude an amzer-se. A-hend-all, ne weler el levr roud ebet eus menozioù Filon (20 araok H.S. - 54 goude H.S.), pezh n'hellfemp ket kompren mar bije bet dija en em ziskouezet ar prederour yuzev bras. Ha dre maz eus bet araok Filon e-unan ul luskad a venozioù o tigeriñ an hent dezhañ, e ranker pignat uhel awalc'h er c'hantved kentañ araok H.S. - araok ar bloavezh 50 da vihanañ - evit merkañ he mare d'ar Furnez.

Etre an daou dermen-se pellañ ha tostañ, ez eus tu da resisaat adarre. Dre sellout a-dost ouzh al levr e soñjer awalc'h eo bet skrivet evit startaat hag adkallonekaat en o c'hredenn, Yuzevion an Ejipt gwasket, tregaset ha zoken keskinet. Ano a zo eus mac'homerezh eus heskinerezh (2,10-20; 5,1; 15,14; 16,4; 17,2). Al levr penn da benn, ha muioc'h c'hoazh al lodenn diwezhañ, en em ziskouez evel ur vrentadenn daer-kenañ a-enep an Ejiptiz heskinerion. Ha peogwir ned eo nemet gant Ptoleme Fiskon (146-117) hag e ziskennidi, Ptoleme VIII dreist-holl (117-81), e weler rouaned an Ejipt o sevel a-enep Yuzevion, ez eus da grediñ eo bet skrivet ar Furnez war dro ar bloavezhioù 100-80.

Pal an oberour a zo mirout ouzh e gengredennerion

da vezañ lorbet gant ar Baganiezh ha da zilezel en pleg diaes an heskinerezh feiz santel an Tadoù. Dimezi ebet gant paganed, emezañ ; arabat deoc'h mont a-du gant ar re fallakr a vo barnet kriz gant justis Doue. Ho pet soñj eo bet roet ar gwir Furnez da Israhel, ha na vezit ket touellet gant sevenadur pinvidik an Ejipt; sellit pezh en deus graet gwechall an Aotroù e-kenver e Bobl, ha penaos en deus kastizet gouradoù ar re a heskin bremañ ac'hanoc'h. Ho tieubiñ a ray en un hevelep doare.

Ha koulskoude n'eus ket kalz a levrioù en Testamant kozh a vefe ken ledan ha ken hollvedel enno menozioù an oberour. Ar Bobl dibabet, hen lavarout a ra, eo an hini karget gant Doue da zegas d'ar bed holl, sklerijenn ha furnez gwirion. Rak Doue Israhel a gar an holl dud, hag a c'halv an holl davetañ : ra zilezo ar Baganed o Idolouriezh euzhus evit en em reiñ int ivez d'an Doue bev.

Rannadur ha pennsoñjoù al levr.

Evit kas da benn e vennad en deus an oberour disrannet e levr en teir lodenn disheñvel awalc'h.

Al lodenn gentañ a zo ur c'heñveriadur kaer ha buhezek etre tonkadur ar re reizh hag hini ar re fallakr. Hep arguzerezh ebet, evel tra anat, e tispleg e soñj war ar gudenn-se he devoa nec'het hag enkrezet e-pad

keit-all, eneoù gwellañ Israel. Sklaer eo evitañ : Doue en deus graet an den evit an divarvelezh. Ha setu amañ petra a dalv ar ger-se hervez e venoz : ene an den reizh goude ar maro, ne chom ket evel kousket en deñvalijenn ar Cheol ; ar vuhez a garantez hag a anaoudegezh Doue, en deus kroget ganti war an douar, ar vuhez-se ne varv ket, kenderc'hel a ra war an tu all, ma tañva an ene hep diwezh e kichen Doue, brasañ levenez. Ar vuhez war an douar n'he deus ken eta nemet un dalvoudegezh : kas d'ar vuhez divrall-se. Moarvat ne gomz ket an oberour eus dasorc'hidigezh ar c'horf, daoust ma vefe diouzh linenn e soñj ; tonkadur an ene eo ar pezh a gont evitañ.

Ar Furnez eo an hini a gas d'an divarvelezh. Met petra eo ar Furnez ? An eil lodenn a ya d'hen displegañ. Ar Furnez eo sklerijenn Doue o tont betek an dud, sklerijenn a zo war un dro sikour ha skoazell evit ar galon a resev anezhi. Heñvel awalc'h eo ouzh ar pezh a anvomp gras gant an Testamant nevez, mar roomp da vihanañ d'ar ger-se an dalvoudegezh ledan a zo hec'h hini. Rak sklerijenn ar Furnez resevet en kalon an den, a gaera hag a vlegn anezhañ er vuhez-mañ, betek e zegas da levenez an da-zont. Ne zistro ket goullo war-du Doue. Goude reiñ pep mad d'an den, pa ziver eus mammenn pep madelezh, hi a sach war-du Doue ar re en em zigor dezhi.

Ouzhpenn maz eo sklerijenn ha sikour Doue o'n em reiñ d'an dud a-unanoù, eo ivez ar Furnez galloud Doue o ren an Istor hag o c'houarn tonkadur e bobl e-kerzh an amzer. Hag evel maz eo ar Furnez an hini a gondaon an dud fallakr a-unanoù, eo hi ivez a argas hag a gastiz ar pobloù disakr. Sed eta gant an trede lodenn ur brederiadenn diwar-benn Istor Israel ha dreist-holl an Ermaeziadeg, displegadurioù diouzh doare ar Midrash rabinek, lec'h en em vesk gant danevell ar Bibl, mojennoù, hengounioù, ha betek faltaziennoù an oberour. N'eus ket amañ da bouezañ re war ar mudoù, na da vurutellañ betek re diskleriadenn pe ziskleriadenn : an oberour a fell dezhañ prezeg, hag ober a ra gant troioù an helavarerezh. E c'hoant a zo kentoc'h, dindan skeudenn an Istor ha darvoudoù an Ermaeziadeg, tamall da Ejiptiz e amzer, o idolouriezh, o mac'homerezh hag o dallentez a-vremañ. Doue eo an hini a zo trec'h, hag a drec'ho, an hini en deus roet d'e bobl braster ha klod, hag harpet anezhi "e pep mare hag e pep lec'h".

Talvoudegezh ha kanonegezh al levr.

Mar he deus koshaet an trede lodenn-se hag a zo bet marteze an hini muiañ-prizet gant degemererion al levr, e chom bev ha yaouank-kenañ an 9 pennad kentañ, ken kaer pa zisplegont dimp priz neñvel ar vuhez, tec'hadenn herrus an eurioù, ar ret maz eo ar stourm, faezhi-

digezh asur ar re fall ha splañder trec'h ar re reizh. En ur bed troet endro da azeuliñ an danvez, ar mac'ho - merezh hag an tiranterezh a bep seurt, e kendalc'h be - pred ar Furnez da youc'hal dimp ez eus evit ar justis hag ar mad un difenner nerzhus a ro gopr evit gwir d'e servijerion en divarvelezh, hag a oar ivez a-dal bre - mañ, d'an eur divizet gantañ, skeiñ garo gant an droug ha bezañ dialour.

Skrivet diwezhat hag en gresianeg, ne oa ket Levr ar Furnez e Bibl Yuzevion Balestina. Yuzevion an Dias - pora avat, oc'h implijout ar gresianeg, o devoa dege - meret anezhañ. An Iliz kristen yaouank ivez a roas lec'h dezhañ e-touez levrioù all an Testamant kozh, peogwir he deus implijet end-eeun testenn c'hresianek ar Bibl. Aes eo gwelout eo bet levezonet gant Levr ar Furnez menozioù Sant Yann ha Sant Paol. Maz eus bet di - wezhatoc'h kristenion o teurel diskred warnañ, n'int o ket bet heuliet gant an Iliz hec'h-unan. Tostoc'h dimp ar Brotestanted, evit an hevelep abeg ne oa ket bet de - gemeret ar Furnez er Bibl hebreek, o deus dilezet ane - zhañ ermaez eus o Bibl. Met n'hon eus ket da vont di - war hengredenn an Iliz a-dal ar marevezh abostolek , p'he deus bepred sellet ar skrid-mañ evel awenet gant Doue, hag anavezet al levr-mañ eus an Testamant kozh evel unan eus ar re dostañ d'ar C'hrist gant e gelen - nadurezh hag e esper.

LEVR AR FURNEZ

+++++

LODENN GENTAN

AR FURNEZ HA TONKADUR AN DEN (1-5)

Klask Doue ha diwall diouzh ar pec'hed.

1. 1 Karit ar reizhder, c'hwi gouarnerion ar bed,
Ho pet menozioù reizh e-keñver an Aotrou,
Ha klaskit anezhañ en eeunded ar galon.
- 2 Rak kavet e vez gant ar re na dentont ket anezhañ:
En em ziskuilh a ra d'ar re na nac'hont ket o feiz
outañ.
- 3 Met ar menozioù fallakr a laka da bellaat diouzh
Doue,
=====
2. Tentañ an Aotrou a zo daeñ anezhañ dre ren ur vu -
hez kontrol d'e youl ha lavarout evelato e klasker ane -
zhañ : ur seurt buhez hag emzalc'h a ene ne c'hell ne -
met hegasiñ reizhder Doue.

Hag an Hollec'halloud, mar klasker e aprouiñ, a zistaol
an dud diboell.

4 N'an tre ket ar Furnez en un ene direizh,
N'a ket da chom en ur c'horf dalc'het gant ar pec'hed;
5 Ar Spered Santel, hor c'helenner, a dec'h dirak an
tromplerezh

Mont a ra pell diouzh ar menozioù difur ;
Gwall-feuket eo pa zegouezh ar Fallagriezh.

6 Ur spered karer an dud eo ar Furnez ;
Nemet ne lezo ket an droukkomzer digastiz evit e lavar
Rak Doue 'zo arvester e lonezi,
Enseller gwirion e galon,
Ha selaouer lavarou e deod.
7 Spered an Aotrou a leugn an hollved ;
En hag a zalc'h pep tra unvanet, a oar kement a vez
lavaret.

8 N'eus hini eta eus ar re a laosk komzoù disakr,
a c'hellfe en em laerezh dioutañ,
Ar Justiz dialerez ne lezo ket anezhañ da dec'hout
kuit.

=====

3. Diboell a zo bapred da gemer en levrioù a furnez,
en ur ster ledan, heñvel ouzh difur.
6. Al lonezi a zo en yezh ar Bibl, sich an esmae hag
ar c'hoantegezhiou diemskiant ; ar galon avat a zo e-
viti sich an emskiant hag ar youl. Ar ster amañ a zo

9 Enklask a vo graet war vennadoù an den fallakr,
Ha trouz e gomzoù a savo betek an Aotrou,
Ma vezo kastizet e dorfedoù.

10 Ur skouarn warizius a selaou pep tra :
Hiboud ar mouskomzoù zoken n'eo ket kuzh eviti.
11 En em virit eta diouzh ar c'hlemmoù didalyoud,
Ha diwallit ho teod diouzh an drouk-lavaroù ;
Rak ne chom ket diefed ar gomz ar guzhetañ,
Ar genoù gaouiat a to maro d'an ene.

12 Na redit ket war lerc'h ar maro gant dihenchadu-
rioù ho puhez,
Na sachit ket warnoc'h ar rivin gant oberoù ho
taouarn.

13 Doue n'en deus ket graet ar maro,
N'en em blij ket gant kollidigezh ar re vev.
14 Krouet en deus an holl draoù evit ma vint en o boud ;
Krouadurioù ar bed a genlabour d'ar silvidigezh,
N'eus enno kontamm ebet a varo,
Ha ne ren ket an Ankoù war an douar.

15 Rak divarvel eo ar Justis.

Ar vuhez hervez an dud disakr

16 An dud fallakr avat a c'halv an Ankoù gant o dorn
hag o mouezh ;

=====

enta : n'eus netra kuzh da sell Doue.
14. An Ankoù, an "Hades" en destenn, a zo amañ galloud

Hag o sellout outañ evel ouzh ur mignon,

en em roont dezhañ ;

Gantañ e skoulmont kevredadurezh

Dellezek maz int da vezañ e lod.

2. 1 Rak en o soñjoù e lavaront dezho o-unan :

Berr ha trist eo hor buhez,

Remed ebet pa zeu evit an den e dremenvan,

N'anaver den ebet a zieubfe diouzh an Hades.

2 Dre zegouezh omp deuet da vezañ,

Ha goude-se e vezimp evel pa ne vijemp ket bet :

Ur vogedenn eo c'hwezh hon difronn,

Hag ar soñj, un elvenn-dan o strinkañ eus talmerezh

hor c'halon.

3 Mar deu hi da vervel e tistro hor c'horf da ludu

Hag e steuz hor spered evel un aezenn skañv.

4 Gant an amzer e kouezho hon ano en ankounac'h

Ha den ebet ken n'en devo koun eus hon oberoù.

Tremen a ray hor buhez evel ur goumoulenn en he roud,

Steuziañ a ray evel ur vrumenn

Skarzhet kuit gant skinoù an heol

Ha dispennet gant an tommder.

5 Ya, evel tremen ur skeud eo hor buhez :

Ur wech deuet ar fin n'eus distro ebet d'an deroù,

Laket e vez ar siell, ha n'eus den o tont endro.

=====

ar maro personelaet.

=====

6 Deuit 'ta ! Tennomp dudi eus ar madoù gwirion ;

Hastomp en hor yaouankiz d'ober implij eus ar

'c'hrouadurioù.

7 En em vezvomp gant gwinoù c'hwek ha gant frondoù,

Na lezomp ket bleunienn an nevez-amzer da dremen.

8 En em gurunennomp gant boutonoù-roz araok

na weñfent,

9 Na vo hini ac'hanomp o vankout d'hor mezhvadeg ;

Lezomp dre-holl, sinoù eus hol levenez :

Rak honnezh eo hol lodenn ! Hennezh hon tonkadur !

10 Gwaskomp ar just mar 'd eo paour,

Na espernomp ket an intañvez,

Doujañs ebet evit blev gwenn an den kozh karget

a vloavezhioù.

11 Hon nerzh da vezañ diazez ar gwir :

Rak an den gwan, sklaer eo, ne servij da netra.

12 Enkomp an den reizh, peogwir e ra diaes dimp,

Ha peogwir en em sav a-enep hon doareoù

Pa rebech dimp terriñ al lezenn,

Pa damall dimp bezañ treitourion d'hon diorroadur.

13 Eñ a lavar gant stad eo perc'henner

anaoudegezh Doue

Hag e-unan en em anv mab an Aotroù ;

14 Bepred emañ aze evel ur rebech d'hor soñjoù ;

=====

6. Pe marteze : "Ar madoù a-vremañ".

Ar gwel anezhañ hepken a zo dimp ur bec'h.

15 E vuhez n'eo tamm ebet heñvel ouzh hini ar re all,
Disheñvel a-grenn maz eo e zoare.

16 D'e soñj ned omp nemet danvez brein,
Hag en em ziwall a ra diouzh hon hentoù evel diouzh
saotradur.

Embann a ra uhel ez eo evurus fin an den just,
Hag en em fougeal a ra da gaout Doue da dad.

17 Gwelomp daoust ha gwir e vefe e lavarou,
Arnodomp petra vezo e dremenvar.

18 Rak mar'd eo an den just mab da Zoue, e teuio Doue
d'e zifenn ;

E zieubiñ a ray eus a dre daouarn e enebourion.

19 Aprouomp anezhañ gant dismegañsoù ha bourrevia-
duriou

Mac'h anavezimp e habaskter,

Ma welimp en efed e basianted.

20 Kondaonomp anezhañ d'ar maro mezhusañ,

Peogwir, diouzh e glevout, e teuio Doue d'e sikour.

Drouk-fazi ar re fall

21 Setu pezh a soñjont, met faziañ a reont ;

Dallet int gant o fallagriezh.

=====

2,20. Souezhus eo pegen rik e talv ar gwerzadoù-se e-
vit hor Salver, evel m'o deus hen gwelot mat Tadoù an
Iliz.

16. Danvez brein pe moneiz faos.

22 N'anavezont ket sekredoù Doue,

Ne c'hortozont gopr ebet evit ar santelezh,

Ha n'houlont ket krediñ en gonid an eneoù dinamm.

23 Doue avat en deus krouet an den evit an divarvelezh,
E c'hraet en deus 'vit bezañ ur skeudenn deus e natur-eñ;

24 Met dre warizi an Diaoul-eo deuet ar maro er bed :

Hen arnodiñ a raint, ar re-se hag a zo dezhañ !

Tonkadur ar re reizh e-keñver an dud fall

3.1 Hogen eneoù ar re reizh a zo etre daouarn Doue,

Ha ne vo gwask ebet evit tizhout anezho.

2 Da sell ar re ziboell o deus seblantet mervel ;

O zremenvar en deus hañvalet bezañ ur gwalleur,

3 Hag o disparti diouzhimp, un distro d'an netra :

Int avat a zo er peoc'h.

4 Ha mar o deus, da sell an dud, gouzañvet kastizadurioù,

Eo leun o esper a zivarvelezh.

5 En eskemm da boanioù'skañv e resevint un eurvad bras :

=====

4. Leun eo o esper a zivarvelezh. Setu dirouestlet e-
vit oberour al levr-mañ ar gudenn a oa nec'het ganti
Yob ha Koheleth. Sur mat, emezañ, ez eus evit an ene
reizh levenez peurbad en Doue, daoust ne oar ket c'ho-
azh petra vo al levenez-se.

Rak Doue en deus aprouet anezho
Hag o c'havet en deus dellezek dioutañ e-unan ;
6 Evel an aour en teuzlestr en deus aprouet anezho,
Evel ul loskaberz en deus o c'havet mat.

7 En deiz e weladenn e vezint hollskedus
Evel elvennoù-tan o redek a-dreuz d'ar soul.

8 Gourc'hemenn a raint war ar broadoù hag e renint
war ar pobloù,

Hag an Aotroù a vezo da viken o roue.

9 Ar re a lak o fiziañs ennañ a gomprenn, ar wirionez
Hag ar re feal a chomo en e gichen er garantez :
Rak e zibabidi a gav trugarez ha gras.

10 Hogenarre fall a resevo ar c'hastiz dleet d'o
mennadoù

Int o deus dilezet an hini reizh ha pellaet
diouzh an Aotroù.

11 Ya, gwallevurus ar re a zinac'h ar furnez
hag ar reizhadurezh :

Un aner eo o spi,
Difrouezh eo o strivoù,
Ha dic'honid o labourioù.

12 Diboell eo o gwraez,

=====

7. En deiz e weladenn, tro-lavar ar Bibl evit envel un
akt ispisial eus Doue, o tegouezhout a-du pe a-enep en
red an da'voudoù. Amañ ez eus kaoz eus ar "weladenn"
diwezhañ, hini ar varn.

Diroll o bugale,
Milliget o lignez !

Gwelloc'h eo bezañ divugel eget kaout lignez fallakr

13 Evurus ar vaquezh divugel met disaotr,
An hini n'anav ket he gwele ar pec'hed ;
En em ziskouez a ray he frouezhusted en deiz
ma vo gweladennet an eneoù.

14 Evurus c'hoazh an eunuk n'ra ket e zorn
fallagriezh

Ha na soñj ket menozioù drouk a-enep an Aotroù :
Resev a ray evit e fealded ur gopr eus an dibab
Hag ul lodenn hetus-meurbet en templ an Aotroù.

15 Rak leun a glod eo frouezh al labourioù mat,
Ha strujus da viken eo gwrizienn ar Furnez.

16 Bugale an avoultreron, int avat,
ne raint ket berzh mat,
Ar ouenn o tiwan diwar ar pec'hed a yelo da get.

17 Zoken mar'd eo hir o buhez, e vint sellet
evel netra,

Hag hep enor e vezo d'an diwezh, o c'hozhni ;

=====

16. Dindan ar ger "avoultreron" e tleer kentoc'h kom-
pren ar Yuzevion difeal d'o relijion, pe Yuzevion di-
mezet gant unan all pagan, avoultreron e-keñver an
dimezi meur-se a zo unvaniezh Doue gant e bobl. Sell.
ouzh Oseah.

18 Mar deu o maro hep dale, n'o devo nag esper,
Na frealz en deiz ar varnedigezh :

Ya, kriz eo tonkadur ul lignez direizh !

4. 1 Gwelloc'h eo chom hep bugale ha bevañ er vertuz

Rak hi ne varvo ket an envor anezhi,

Prizet maz eo gant Doue ha gant an dud.

2 Bezant, e kemerer skouer diwarni,

Ezvezant e huanader war he lerc'h ;

Er beurbadelezh e c'honez ar gurunenn

Evit bezañ trec'h et en emgannoù dinamm.

3 Met gouenn ar re fallakr ne servij ket

dezhi bezañ niverus,

O kreskiñ diwar broustennoù bastard,

ne daolo ket gwrizioù don ;

N'en em ziazezo ket war ur font divrall.

4 Ha goude ma taolfe barradur evit ur pennad,

Krog fall maz eo en douar, e vezo diskogellet

gant an avel

Diwriziennet gant nerzh ar gorventenn ;

5 He skourruigoù, tener c'hoazh, a vo torret ;

Hag o frouezh, re c'hlas evit bezañ debret,

A vo didalvoud, ne servijint da netra.

6 Rak ar vugale ganet eus darempredoù direizh

6. En deiz ar varn, ar varnedigezh-se a zo amañ, ar

roio testeni, en deiz ar varn, eus fallagriezh
o c'herent.

welloc'h eo mervel yaouank eget kozh ha pec'her

Met an den reizh, zoken mar c'hoarvez dezhañ mervel

araok an oad, a gavo an diskuizh ;

8 Ar gozhni enorus, n'eo ket an hini roet gant

buhez hir,

N'eo ket da vezañ muzuliet diouzh niver ar bloavezhioù.

9 Rak ar Furnez a zo kement ha blev gwenn,

Ur vuhez dinamm a zo kement hag un oad kaset da bell.

10 Met hennezh plijus da Zoue a zo bet karet gantañ,

Hag evel ma veve e-touez pec'herion, eo bet dilamet kuit.

11 Tennet eo bet diouto da virout ouzh an droug da wastañ

e spered,

Hag ouzh ar fallagriezh da zihenchañ e ene.

12 Rak achanterezh ar gwall a denvala splannder ar mad,

Ha bouilhard ar c'hoantegezhioù a vreign un ene

dizifenn,

=====

hini a c'hoarvez war an douar, hag a zo bet taolennet
diouzhtu (gwerzadoù 4-5) : abretoc'h pe ziwezhatoc'h e
kouezh ar gwallleur war gouenn an dud fallakr.

13 Deuet e berr amzer da vezañ peurvat, en deus kaset
da benn ur redadenn hir ;
14 Plijus e oa e ene da Zoue,
Hag en abeg da se en deus gant mall tennet anezhañ
eus ur c'helc'hiad diroll.

An dud avat, o welout se, ne gomprenont ket,
Ha ne zeu ket en o spered ar soñj

15 Emañ gras ha trugarez Doue war e zibabidi
Hag e warez war e sent.

16 An den just, gant e varo, a gondaon ar re fall
o chom en buhez ;

Hag ar yaouankiz echu ken buan, a gondaon kozhni
an den drouk.

17 An dud a wel fin an den fur;

Met hep kompren mennadoù Doue en e geñver

N. perak en deus an Aotroù laketañ anezhañ er surentez.

18 Gwelout a reont, hag e tiskouezont o dispri,
Met an Aotroù a c'hoarzho goap outo.

19 Hep dale pell e vezint korfoù maro hep enor,

Distaolet e-touez ar re varo en un dismegañs peurbad

An Aotroù a stlepo anezho, mut, war o fenn

O diframmañ a ray diouzh o sichenn,

Hag e vezint dispennet holl, droukroet d'ar boan ;

Ha da get ez aio an eñvor anezho.

0 Ha pa vo graet ar gont eus o fec'hedoù,

e teuint leun a spouron ;

zorfedoù a savò en o enep evit o zamall.

1 Neuze, gant surentez vras, en em zalc'ho an

den just en e sav,

-dal d'ar re o devo breset anezhañ

a dismegañset ar boan kemeret gantañ.

2 Ouzh e verzout e vint strafuilhet gant ur spouron

euzhus,

saouzanet holl ouzh e welout salvet a-enep d'ar pezh

a c'hortozent.

3 Ha gant morc'hed bras e lavarint an eil d'egile,

oc'h hirvoudiñ en enkreiz o ene :

4 "Hennezh eo an hini hon eus gwechall c'hoarzh et goap

outañ

Ha dismegañset gant hor c'hunujennoù, diboell ma oamp !

Sellet hon eus o vuhez evel ur sotoni

Hag e varo evel un dizenor.

5 Penaos enta emañ kontet e-touez mibion Doue,

kaout perzh en tonkadur ar Sent ?

6 Ya, kantreet hon eus diwar hent ar wirionez ;

=====

5. E-touez mibion Doue, en tonkadur ar Sent, ar gerioù-
se en Testamant kozh, a anv an Aeled. An dud reizh a
zo antreet e bed an Aeled, hag a gav perzh en o gloar.
(Sell.ouzh Yob 1,6 ; 2,1 ; I Tes. 3,13 kenveriet gant
Mazh. 16,27 ha 25,31).

Sklerijenn ar reizhder n'he deus ket lugernet warnomp
An heol n'eo ket bet paret warnomp.
7 Lonket hon eus hor gwalc'h, betek heugañ,
En hentoù ar fallagriezh hag ar gollidigezh,
Ha baleet hon eus e gouelec'hioù diwenodenn :
Hent an Aotroù, n'hon eus ket anavet anezhañ :
8 Da betra en deus talvezet dimp hon lorc'h ?
Pinvidigezh ha pompad, petra o deus degaset dimp ?
Evel ur skeud eo tremenet kement-se
Evel ur c'heloù o redek ;
10 Evel ur vag o regañ an dour fiñvus
Hep na c'hellfe bezañ adkavet tres hec'h hent
Na roudenn he staon er c'houmoù ;
11 Pe c'hoazh evel al labous a nij a-dreuz d'an aer
Hep lezel war e lerc'h arouez ebet eus e dremen :
A daolioù-pluñv e flap an aezenn skañv
Ouzh he regañ gant sourradenn nerzhus ;
Mont a ra en e hent war-bouez hej e ziwaskell,
Ha goude-se ne weler merk ebet eus e red ;
12 Pe c'hoazh pa vez bannet ur bir war-du e bal
E tistro diouzhtu an aer roget, warnañ e-un,
Ken na c'heller ket gouzout dre belec'h eo tremenet.
13 Evelse evidomp-ni : a vec'h ganet, hon eus
paouezet a vezañ,
Ha n'hon eus tres ebet a vertuz da ziskouez :

Er fallagriezh eo bet kuzumet hor buhez ! "

14 Ya, 'vel ar pell skubet gant an avel
eo goanag an den fall,
Evel an eon skañv distaolet gant ar gorventenn ;
Evel ar moged o steuziañ er gwent,
Evel eñvor dibad ostiziad un deiz.

15 Ar re reizh avat a vev da virviken :

Etre daouarn an Aotroù emañ o gopr,
An Uhelañ eo an hini a breder outo :

16 Resev a raint digant dorn an Aotroù
Ar gurunenn roueel klodus hag an taled a gened.
Rak o goudoriñ a ray gant e vrec'h dehoù,
O gwaskediñ a ray dindan e gazel.

17 Da harnez-brezel e kemero e c'hred hag e warizi,
Hag armañ a ray ar c'hrouadurioù evit kastizañ
e enebourion ;

18 E-giz hobregon e wisko ar Justis,
Hag e lakay war e benn da dok-houarn barnerezh
peurleal.

19 Evit e skoed e kemero ar santelezh didrec'hus.

20 Lemmañ a ray e gonnar diblegus evel ur c'hleze :

=====

15. Pe marteze : "En Aotroù emañ o gopr", da lavarout
eo : An Aotroù e-unan a zo dezho da lod ha da c'hopr.

Ar re vihan hag ar re vras, o graet en deus,
Ha preder en deus ouzh an eil re hag ar re all,

8 Nemet ez eus garvoc'h enklask o c'hortoz an dud uhel

9 C'hwi eta, Rouanez, eo a gomzan ouzhoc'h,

Ma teskot ar Furnez ha na gouezhot ket ;

Rak ar re a ra diouzh ar reizhder, a galon reizh,
a vezo kavet reizh,

Hag ar re a zesk anezhañ, a gavo ennañ galloud
d'en em zifenn.

11 Gant-se, c'hoantait va c'homzoù,

En em zougat dezho : ho kelenn a raint.

Aes eo ar Furnez da gaout

12 Skedus eo ar Furnez ha ne goll ket he lufr,

Aes da welout evit ar re a gar anezhi,

Aes da zizoleiñ evit ar re a vez ouzh he c'hask.

13 Dont a ra en arbenn d'ar re a vez ouzh he c'hoantaa
Hag en em ziskouez a ra dezho, hi da gentañ.

14 An nep he c'hask a-dal deroù an deiz,
n'en devo ket poan :

Kavout a ray anezhi, azezet ouzh e zor.

15 Rak soñjal enni a zo poellegezh peurvrat

Ha beilhañ eviti a zo en em lakaat buan

e-maez an nec'h.

16 Hi hec'h-unan a ya dre holl da glask ar re a zo
dellezek anezhi ;

Hag en em ziskouez a ra dezho gant madelezh, war
an hentoù ;

Dont a ra en arbenn dezho d'o harpañ en o mennadoù.

17 Rak an deroù surañ anezhi eo ar c'hoant d'he deskiñ,
Ha c'hoantaat he deskiñ eo karout anezhi,

18 Karout anezhi eo mirout he lezennoù,

Mirout he lezennoù a zo suraat divarvelezh an-unan,

19 Hag an divarvelezh a ro lec'h e-kichen Doue.

20 Evelse c'hoant ar Furnez a gas d'ar roueelezh.

21 Mar plij deoc'h eta kaout tronioù ha bizhier-Roue,
o c'hwi, mistri bras ar pobloù,

Enorit ar Furnez evit bezañ rouaned da viken.

Salamon a ya da ziskleriañ petra eo ar Furnez

22 Petra eo ar Furnez ha penaos eo bet ganet ?

Mont a ran bremañ d'hen diskleriañ,

Ne guzhin ket ouzhoc'h he sekredoù.

Heuliañ a rin he roudoù betek he fenn kentañ,

Evit lakaat en sklerijenn an anaoudegezh anezhi

Hep dihenchañ diwar ar wirionez.

23 Nann, n'in ket da heul an erez krin :

=====
16. Pe marteze : "Mont a ra en arbenn dezho gant he
holl breder".

Houmañ n'he deus netra kumun gant ar Furnez.

24 Rak niver bras ar Furion a zo silvidigezh ar bed,

Hag ur roue poellek a zo berz-mat evit e bobl.

25 En em lezit eta da vezañ kelennet gant va c'homzoù,
Ur gonid evidoc'h e vo kement-se.

Penaos en deus Salamon karet ar Furnez

7. 1 Ned on me ivez, nemet un den marvel, heñvel ouzh
an holl reoù all,

0 tiskenn eus an hini kentañ bet tennet eus an douar.

En askre va mamm on bet furmet en kig,

2 Hag e-pad dek miz am eus kaletañ en he gwad,

Diwar sper ar gwaz hag ar blijadur kumpagnun
ar c'houked.

3 Me ivez, o vezañ ganet, em eus alanet an aer kumun ;

Kouezhet on war an douar hon resev holl

en hevelep doare,

Hag evel gant an holl e voe va c'hriadenn gentañ,
ur gouelvan.

4 Desavet on bet en mailhurennoù gant aked bras.

5 Ha n'eus roue on dije bet un deroù disheñvel :

6 N'eus evit an holl nemet un doare da antren
er vuhez.

=====

2. Dek miz, komprenit : dek miz-loar, doare boaz da ni-
verin gant an dud a wechall.

vel da vont ermaez diouti.

Setu perak am eus pedet, ha meiz a zo bet roet din,
azgoulennet am eus, ha deuet eo din ar spered a Furnez.

Kentoc'h eget bizhier-Roue hag an troniou

am eus prizet anezhi,

Ha n'em eus graet van ebet eus ar binvidigezh

en he c'heñver.

9 N'am eus ket he lakaet e skoazh gant ar maen

priziusañ,

Rak, holl aour ar bed, en he c'heñver, n'eo nemet traez,

Hag an arc'hant, en he c'hichen, ne dalv nemet fank.

10 He c'haret em eus muioc'h eget yec'hed ha kened,

Muioc'h eget ar sklerijenn em eus prizet anezhi,

Rak he lugern n'eus ennañ digresk ebet.

11 Ganti avat ez eo deuet din an holl vadoù,

Ha dre he daouarn, pinvidigezhioù diniver.

12 Hag an holl vadoù-se on bet laouenaet ganto,

Peogwir eo ar Furnez a zegase anezho.

N'ouien ket koulskoude e oa hi o mamm.

13 Ha peogwir em eus he desket gant lealded,

E roan anezhi d'ar re all hep desped :

Ne fell ket din derc'hel kuzh he finvidigezhioù.

14 Rak hi 'zo un teñzor diheskus evit an dud :

Ar re a c'honez anezhi a gav perzh en mignoniezh Doue.
Erbedet maz int dezhi gant madoberoù ar reizhadurezh.

Galv da awenerezh Doue

15 Doue a roio din komz diwar he fenn hervez e youl,
Ha meizañ soñjoù dellezek eus e zonezonoù,
Peogwir eo eñ 'zo e-unan blenier ar Furnez
Ha rener ar Furion ;

16 En e zorn emaomp, ni hag hon lavarou,
Hon holl boellegezh, hag hon holl ampartiz.

17 Eñ en deus roet din anaoudegezh gwirion
eus an traoù,

Gouzout kenaozadur ar bed ha perzhioù an elfennoù,

18 Penn-kentañ, diwezh ha kreiz an amzerioù,
Pep eil tro goursavioù an heol, evel kemm
ar mareoù-bloaz,

19 Dibunadenn ar bloaz, ha lec'hiadur ar stered,

20 Tech-natur an anevaled hag ijin al loened gouez,

=====

14 Gant madoberoù ar reizhadurezh, komprenit : Gant
madoberoù ar vuhez renet diouzh he c'hentelioù.

15. Hervez e youl, kentoc'h eget "evel ma karfen", pe
"Hervez an anaoudegezh am eus diouti", evel ma tro hi-
ni.ennoù.

18. Perzhioù an elfennoù. Tu a vefe ivez da dreiñ :
"Perzhioù ar sterenoù", da lavarout eo : o levezon
war an dud.

alloud ar speredoù, ha soñjezonoù an dud,
purtoù disheñvel ar plant ha vertuzioù ar gwriziennoù :
1 Kement a zo kuzh, kement a zo gwelus am eus desket ;
ak oberourez an holl draou, ar Furnez, he deus
va c'henteliet.

atur, orin, obererezh ha sked ar Furnez

2 Ar spered a zo enni a zo, evit gwir,
ur spered skiantek,

antel, unel, lies,

outil, eskuit, treantus, disaotr,

sklaer, distrafuilh, karour ar mad, troc'hus,

23 Diharzus, madoberus, mignon an dud,

Digemm, start, dinec'h,

Peurc'halloudus, hollevezhier, trebarzher

an holl speredoù,

Ar re veizek, ar re bur, ar re digorf.

24 Rak eskuit eo ar Furnez muioc'h eget pep fiñv ;

Treantañ ha trebarzhiañ a ra pep tra

en abeg d'he glanded.

25 Hi a zo ur c'hwezh eus galloud Doue,

=====

22. Ar perzhioù staget ouzh ar Furnez gant an oberour,
a zo 21 an niver anezho : a-zevri-kaer, rak 21 a zo 3
gwech an niver 7, niver doueel ha niver ar c'hloster
evit ar Yuzevion hag ar C'hresianed.

Levr ar Furnez : 7,25 -- 8,2

Un diveradur glan eus klod an Hollc'halloudeg ;
Ha gant-se ne c'hell netra nammet en em silañ enni.
26 Un dassked eus ar sklerijenn beurbadel ez eo hi,
Ur melezour dizintr eus obererezh Doue,
Ur skeudenn eus e vadelezh.

27 Eviti da vezañ hec'h-unan-penn, e c'hell pep tra,
Hag o chom enni hec'h-unan, ec'h adnevesa pep tra.
En em skuilhañ a ra a-hed an oadvezhioù,

en eneoù santel,

Oc'h ober anezho mignoned Doue ha profeted ;

28 Rak Doue ne gar nemet an nep a vev gant ar Furnez.

29 Kaeroc'h eget an heol ez eo hi,

Splannoc'h eget ar strolladoù-stered.

Keñveriet gant ar sklerijenn ez a an trec'h ganti :

30 Rak honnezh a loz he lec'h d'an noz,

E keit ne dalvez ket ar gwall a-enep ar Furnez.

8. 1 Tizhout a ra he nerzh eus an eil penn d'ar bed
betek egile,

O kenurzhiañ pep tra gant madelezh.

Ar Furnez a zo pep madelezh enni

2 Hi eo an hini am eus karet ha klasket

a-dal va yaouankiz ;

Strivet em eus d'he c'havout da bried ,

Levr ar Furnez : 8,2 -- 8,9

Ha deuet on da vezañ karour he c'hened.

3 Ar fed m'emañ o chom gant Doue,

a ziskouez uhelder hec'h orin,

Rak mestr an hollved en deus karet anezhi.

4 Hi, evit gwir, a zo digor dezhi, skiant Doue ;

Hag hervez he dibab, e ren an Aotroù e labourioù.

5 Mar'd eo ar binvidigezh tra da c'hoantaat er vuhez,

Petra pinvidikoc'h eget ar Furnez, oberourez pep tra ?

6 Mar'd eo ar poell a vez sevenet gantañ al labourioù,

Piw en hollved a vefe gwelloc'h vicherourez egeti ?

7 Ha karout a rit ar reizhadurezh ?

Hi eo ar vertuzioù frouezh he labour,

Rak kelenn a ra kerreizhded ha poellegezh,

Justis ha kalonegezh,

Ha n'eus er vuhez, evit an dud, netra talvoudekoc'h.

8 Daoust ha c'hoantaat a rit ledander ar skiant ?

Hi a anavez an tremened hag a raksell an da-zont ;

Hi a oar stummañ lavarennoù ha dizoleiñ

an divinadennoù ;

Anavout a ra en araok an arouezioù hag ar burzhudoù,

Evel dibunadenn ar marevezhioù hag an amzervezhioù.

9 Neuze 'm eus divizet ober anezhi

kumpagnunez va buhez,

O c'houzout e vefe va c'huzulierez vat em deizioù
evurus,
Va frealz em nec'hamantoù hag em foanioù.
10 En abeg dezhi, a soñjen, em bo brud-vat
en engroez ar bobl,
Hag evidon da vezañ yaouank, enor e-touez ar re gozh.
11 Em barnedigezhioù e vin kavet lemm a spered,
Hag ouzh va gwelout e vo estlammët ar re vras.
12 Mar tavan, e chomint o c'hortoz ;
Mar komzan e roint o skouarn d'am c'hlevout,
Mar dalc'han gant va lavar a lakint o dorn war o genoù
13 Ganti e c'honezin an divarvelezh,
Hag e lezin soñj peurbad d'ar re a zeuio war va lerc'h
14 Gouarn a rin ar pobloù, hag e vo
sujet din ar broadoù.
15 Rouaned spouronus, dre glevout va ano hepken,
o devo aon ;
E kreiz va fobl en em ziskouezin mat,
ha kalonek er brezel.
16 Distroet d'ar gêr e tiskuizhin en he c'hichen :
Rak n'eus c'hwervder ebet gant he daremprediñ
Anoaz ebet ouzh he fleustrin,
Met levenez ha joa ganti.

=====

12. Lakaat an dorn war ar genoù, doare da ziskouez ur
estlamm bras (Mik. 7,16; Yob 21,5; 29,9; 40,4).

Pedenn Salamon da c'houlenñ ar Furnez
17 O prederiañ ennon-me war an dra-se
Hag oc'h eveshaat em c'halon
Penaos e kaver divarvelezh o'n em unaniñ gant ar Furnez,
18 Plijadur leun en he mignoniezh,
Pinvidigezhioù diheskus en labour he daouarn,
Ar boellegezh en he darempredoù,
Ar vrud-vad o'tivizout ganti,
Eñ'h aen a bep tu, en ur glask penaos e c'hellfen
he c'haout ganin.
19 Ur bugel a demz-natur mat eoan,
Un ene dizrouk am boa resevet evit va lod,
20 Pe gentoc'h, o vezañ mat, e teuen en ur c'horf
disaotr.
21 Met goude kompren he c'hellfen gonit ar Furnez,
nemet dre zonezon Doue,
- Ha se dija a oa Furnez, gouzout eus piw
e teu ar c'hras-se
En em droen war-du an Aotroù hag e peden,
Hag a greiz va c'halon e lavaris dezhañ :
2. 1 "Doue hon Tadoù, Aotroù a drugarez,
Te hag ac'h eus, gant da goma, graet an hollved,

Te hag ac'h eus, gant da Furnez, stummet an den,
 Dezhañ da vestroniañ ar c'hrouadurioù bet savet ganit
 3 Da c'houarn ar bed er santelezh hag er reizhder,
 Ha da varn an dud a galon eeun,
 4 Ro din an hini he deus lec'h war da dron

ez kichen, ar Furnez,

Ha n'am argas ket ermaez eus niver da vibion.
 5 Rak da servijer ez on ha mab da servijerez,
 Un den gwan ha berrbad e vuhez,
 Divarrek da gompren ar reizhadurezh hag al lezennoù.
 6 Ha pa vije unan peurvat e-touez mibion an dud,
 Mar mank dezhañ ar Furnez a zeu diganit,
 e vo kontet evit netra.

Te ac'h eus va dibabet evit ren da bobl,
 Evit gouarn da vibion ha da verc'hed.

8 Gourc'hemennet ac'h eus din sevel un Templ
 war da venez santel,
 Un aoter er gêr-se ac'h eus diazezet enni da deltenn,
 Skeudenn eus an deltenn sakr ac'h eus aozet
 a-dal an deroù.

9 Ganit emañ ar Furnez a anavez da oberoù,
 Dre m'edo aze ganit pa raes an hollved.
 Hi a oar petra 'zo plijus d'az taoulagad,

=====

8. An neñv eo moarvat a zo da gompren evel gwir temp
 Doue (Salm. 11,4; 18,7; Diskul. 3,12) ned eo templ Je-
 ruzalem nemet un eilskeudenn anezhañ (Hebr. 8,2-5 ;
 9,23-24)

Ha petra 'zo kenson gant da c'hourc'hemennoù.
 10 Kas anezhi eus an neñvoù meurdeus,
 He laka da ziskenn eus kador veur da glod,
 Evit ma 'm skoazello ha ma labouro ganin
 Ha maz anavin petra 'blij dit,
 11 Rak gouzout a ra pep tra, kompren a ra pep tra.
 Va bleniañ a ray gant poellegezh em oberoù,
 Va diwall a ray gant nerzh he gloar.
 12 Ha plijus dit e vo neuze va labour,
 Gouarn a rin da bobl gant justis,
 Hag e vin dellezek eus kador-veur va zad.

13 Pehini an den a c'hell anavout mennad Doue ?
 Ha piw a c'hell meizañ bolontez an Aotrou ?
 14 Lent eo soñjoù an dud varvus
 Hag horjellus hor mennadoù ;
 15 Rak hor c'horf breinadus a bonnera hon ene,
 Hag an ti-annez priek-mañ a sach d'an traoñ
 ar spered mil-ha-mil e soñjoù.

16 A vec'h ma tivinomp ar pezh a zo war an douar,
 A boan ma kavomp ar pezh a zo dindan hon dorn :
 Piw enta en deus dizoloet ar pezh a zo en neñvoù ?
 17 Ha da youl, piw en divije anavet anezhi,
 Mar n'az pije da-unan roet ar Furnez,
 Ha kaset eus an nec'h da Spered santel ?

Levr ar Furnez : 9,18

18 Evelse eo bet eeunaet hentoù ar re
a zo war an douar,
Evelse o deus desket an dud ar pezh a zo plijus dit,
Ha gant ar Furnez int bet salvet ".

Levr ar Furnez : 10,1 — 10,4

TREDE LODENN

FURNEZ DOUE E-KERZH AN ISTOR.

Eus Adam da Voizez

10. 1 Hi eo an hini a warezas Tad ar bed,
An den kentañ bet stummet gant Doue
pa voe krouet e-unan-penn.
Hi eo a dennas anezhañ eus e bec'hed,
2 Hag a roas dezhañ nerzh da vestroniañ pep tra.
3 Met ar pec'her pa'n em zispartias diouti en e gonnar,
A yeas d'en em goll war-bouez e fulorioù lazh-e-vreur.
4 Ha pa voe beuzet an douar en abeg dezhañ,
E voe ar Furnez a salvas c'hoazh ar bed,
5 O vleniañ an den just a-dreuz d'an dourioù

- =====
1. Tad ar bed : Adam.
 2. Ar pec'her : Kaïn.
 4. En abeg dezhañ, da lavarout eo en abeg d'e ziskennidi o devoa bet e fallagriezh da herezh. Soñj ar fallagriezh-se, unan eus hengounioù ar Yuzevion (sell. ouzh an istorour Yosef, Antiq. 1,2,2).
 4. O vleniañ ar just, Noe hag a oa un den just (Gen. 6,9)

war ur prenn didalvoud.

5 Ha goude ma voe bet droukvesket ar broadoù,
ken ha ken bras o falloni,

Hi eo a anavas an den reizh, a viras anezhañ
direbech dirak Doue,

Hag a lakas ennañ kalonegezh da drec'hiñ war
e denerded ouzh e vab.

6 Hi eo a salvas an den just en deiz ma voe distrüjet
ar re fallakr,

Pa roas dezhañ tec'hout dirak an tan
o tiskenn war ar Pemp Kêr.

7 Hag en testeni d'o fallagriezh e tivoged
bepred an douar drastet-se,

Lec'h ma ro ar brousgwez frouezh na zarevont ket,

Lec'h ma sav, envoradur un ene difeiz,
ur golonenn holen.

8 Rak o pellaat diwar hent ar Furnez,

Pezh o deus graet an dud-se n'eo ket hepken
dioueriñ anaoudegezh ar mad,

Lezet o deus c'hoazh d'ar re vev
un testeni eus o follentez

=====

5. Hi eo a anavas an den reizh : amañ eo galvedigezh
Abraham a zo meneget.

6. Hi a salvas an den just : Lot. Ar Pemp Kêr a oa a
nezho Sodom, Gomorra, Adama, Seboim ha Segor. An hin
diwezhañ-mañ a voe espernet diwar bedenn Lot en em re
puas enni.

Evit na c'hellfe ket o zorfedoù chom dindan guzh.

9 Hogen ar Furnez he deus dieubet eus o zrubuilhoù,
ar re a zo bet feal dezhi.

10 Hi a vlenias war hentoù digammdro, an den just,
Pa dec'he dirak konnar e vreur.

Dezhañ e tiskouezas rouantelezh Doue,

Hag e roas dezhañ anaoudegezh an traou santel ;

E binvidikaat a reas en e labourioù kalet,

Hag e lakaas e boanioù da zougen frouezh ;

11 E skoazellañ a reas a-enep gwaskerion kivioul,

Pourchas a reas dezhañ madoù bras.

E ziwall a reas ouzh e enebourion,

E zifenn a reas a-enep ar re a stegne pechoù dezhañ.

Reiñ a reas dezhañ an trec'h en ur stourmad kalet,

Evit deskiñ dezhañ ez eo an deoliezh

galloudekoc'h eget tra.

13 Hi ne zilezas ket an den just bet gwerzhet,

Met e ziwall a reas diouzh ar pec'hed ;

14 Diskenn a reas gantañ en e brizon,

Gantañ e chomas en e chadennoù,

=====

10. An den just pa dec'he... : Yakob, pa rankas tec'hout
dirak Esaou. Ha goude-se, ar meneg eus e weledigezh en
Bethel, hag eus e stourm ouzh Doue.

13. Yosof gwerzhet gant e vreudeur. Sell.ouzh Gen. 37
hag all.

Betek degas dezhañ ar vazh-roue
Hag ar vestroniezh war e vac'homerion,
Betek diskouez gaouiat ar re o devoa divrudet anezhañ
Betek reiñ dezhañ klod peurbadel.

An Ermaeziadeg

15 Hi eo a zieubas eus ar vroad wasker
Ar bobl santel, ar ouenn didamall.
16 Antren a reas en ene ur servijer-Doue,
Ha gant marzoù ha sinoù, hi a zalc'has
penn ouzh rouaned spouronus.
17 D'ar re santel e roas gopr o labourioù ;
O bleniañ a reas dre an hent burzhdus
O vezañ evito ur gwasked e-pad an deiz
Hag evel ar sklaerder eus ar stered e-pad an noz.
18 O lakaat a reas da dreizañ ar Mor Ruz,
O bleniañ a reas a-dreuz d'an dourioù bras,
E-keit ma lonke o enebourion gant an tonnoù,
Ha ma tistaole anezho eus donder an islonk.
20 Ar re reizh evelse, a zibourc'has ar re fallakr :
Lidañ a rejont, Aotroù, da ano santel
Hag a-unvouezh e kanjont da zorn gwarezus ;

=====

16. Ur servijer-Doue: Moizez a reas d'ar Yuzevion mont
ermaez eus an Ejipt.

17. Gopr o labourioù : al listri hag ar podoù priziuz
a gasas an Hebreed ganto o vont kuit eus an Ejipt.
(Erm. 3,21-22; 11,2-3; 12,35-36).

21 Rak ar Furnez a zigoras o genoù d'ar vuded,
Hag a zistagellas a zeod d'ar re vihan.
11. 1 Renet gant dorn ur profed santel
E lakaas anezho d'ober berzh.
2 Treuziñ a rejont ur gouelec'h digenvez,
Hag en lec'hioù dizarempred e plantjont o zelttennoù.
3 Derc'hel a rejont penn ouzh o enebourion,
Hag e tizarbennjont o argaderion.
4 En o sec'hed e pedjont ac'hanout :
Hag eus ur roc'h a-serzh e voe roet dourioù dezho,
Eus ar maen sec'h, distan 'vit o sec'hed.

An dour, kollidigezh evit an Ejiptiz,

silvidigezh evit Israhel

5 Evelse, ar pezh en devoa servijet
da gastizañ o enebourion
A zeuas da vezañ evito ur mad en o enkrez.
6 Ar re-se n'o devoa ken nemet dour ur stêr diheskus
Strafulhet gant gwad ha fank,
Evit o c'hastizañ eus ar c'hemennadur
a ouestle ar vugale d'ar maro ;
7 D'az tud avat ac'h eus roet, a-enep da bep esper,

=====

5. Sed amañ an hini kentañ eus ar 6 kenenebadur etre
Israheliz hag Ejiptiz a grog ganto an oberour. Ar 5 all
a vo displeget gantañ pelloc'h adalek ar pennad 16.

dourioù puilh,

8 En eur ziskouez dezho gant ar sec'hed
a c'houzañvjont neuze

Gant pebezh reuz az poa kastizet o enebourion.

9 Gant an amproenn-se, ha ne oa koulskoude
nemet kastiz trugarezus,

E komprenjont pebezh poan o devoa diwasket an dud fa
dindan ur varnedigezh a gonnar ;

10 Rak int-i, o amproñ a raes, evel un
tad o rakkemenn,

Met ar re all, o c'hastizañ a raes
evel ur roue garv o kondaoniñ ;

11 Ha pa vefent pe a bell pe a dost da Israhel
eo bepred un hevelep doan o deve.

12 Ur glac'har doubl a grogas enno,
Un huanad doubl gant soñj an tremened :

13 Rak o klevout e troe da vad ar re all,
pezh a oa bet o c'hastiz,

E santjont dorn an Aotrou ;

14 Hag an hini o devoa gwechall kinniget d'ar maro
ha distaolet gant dispriz,

Ec'h estlammjont dirazañ a-benn ar fin,

Dre m'o devoa gouzañvet sec'hed, en un doare
disheñvel-kaer diouzh ar re vat.

Habaskter an Aotrou e-keñver an Ejipt

15 Dihenchet ma oant gant o soñjoù foll ha fallakr,
Betek mont d'azeuliñ naered dispered

ha loened reuzeudik,

E kasjout dezho evit o c'hastizañ un engroez

a loened dispered,

16 Evit deskiñ dezho e vezer kastizet gant ar pezh
a bec'her drezañ.

17 Ne oa ket diaes d'az torn hollc'halloudek,

- En dous krouet an hollved eus an danvez distumm -
Kas a-enep dezho bandennoù arzed pe loened dispart,

18 Pe loened gouez dianav ha nevez, leun a gonnar,

o tialanat ur c'hwezh tanflammet,

Pe o tivogediñ un aezenn flaerius,

Pe o teurel gant o daoulagad luc'hed spourenus ;

19 Loened gouest n'eo ket hepken d'o gloazañ

ha d'o lazhañ,

Met ivez d'o lakaat da vervel gant ar spont hepken

dirak o neuz.

20 Zoken hep kement-se e c'hellent mont da get

gant nerzh ur c'hwezhadenn hepken,

Argaset gant da justis ha skubet gant avel

da c'halloud.

Met urzhiet ac'h eus pep tra gant muzul,

niver ha pouez ;

21 Rak da c'halloud bras a zo bepred

dindan da c'hourc'henn,
 Ha piw a c'hell herzel ouzh nerzh da vrec'h ?
 22 Dirazout emañ an hollved, evel ur fulenn-boultr
 n'hall ket lakaat ar valañs da gosteziñ,
 Evel an dakenn glizh-beure o tiveriñ war an douar,
 23 Truez ac'h eus ouzhip dre ma c'hellez pep tra,
 Serriñ a rez da zaoulagad ouzh pec'hedoù an dud
 evit ma tistroint diouto.
 24 Ya, karout a rez an holl vodoù, ha ne heugez
 dirak netra eus kement ac'h eus krouet ;
 Peogwir n'az pije ket graet un dra bennak mar
 az pije kasaet anezhañ.
 25 Ha penaos e c'hellfe un dra bennak derc'hel
 da vezañ, mar n'az pije ket hen youlet ?
 Penaos e chomfe tra ebet en e vezoud, mar n'az
 pije ket hen galvet ?
 26 Met espern a rez an holl vodoù, dre maz out-te
 perc'henn pep tra, te, Aotrou, karour ar vuhez,
12. 1 Te hag a zo da c'hwezh divréinus e pep tra !
 2 Setu perak eo tamm ha tamm e kastizez ar re a gouez
 Reiñ a rez kemenn dezho o tiskouez dezho
 en petra e pec'hont,

=====

22 Ur fulenn-boultr : troidigezh diasur. Reoù all
 dro : " evel ur c'hrouanenn a lak ar valañs da goste-
 ziñ ".

it ma'n em zistroint diouzh an droug
 ha ma kredint ennout, Aotrou !
baskter Doue e-keñver Kanaan
 Ya, kasoni az poa kemeret ivez ouzh annezherion gozh
 an douar santel,
 En abeg d'o zorfedoù argarzus, achantouriezh,
 lidoù disakr.
 Al lazherion kriz-se a vugale,
 en debrerion-se a flugez en banveziou a gig-den,
 deskoniet en mezvadegoù gwad,
 Ar gerent-se muntreherion tudigoù dizifenn,
 ar re-se az poa divizet o c'has da get dre
 zorn hon tadoù,
 Evit d'an douar-se, karet ganit etre an holl,
 resev un drevadennad dereat a vibion da Zoue.
 Evelato, ar re-se zoken, dre ma oant tud,
 ac'h eus damantet dezho,
 Kaset ac'h eus outo pennmarc'hed, evel
 diaraogerion d'az arme,
 Evit o distrujañ tamm ha tamm hepken.

=====

4. Sell.ouzh an Adlezenn 12,31; 18,10-11.
 5. Sell. ouzh Adlezenn 12,3; 18,10-11; Leviegezh, 18,21.
 Testeniet mat eo al lazherezh-bugale e-touez Kanaaniz,
 gant ar Bibl e-unan (Ps. 105, 37-38; Yosouah, 6,26;
 I Rouaned 16,34; II Rouaned, 3,27; 16,3) ha gant di-
 zoloadennoù an Hendraouriezh.

9 N'eo ket n'az pije ket gallet lakaat ar re reizh da
flastrañ an dud fallakr en un emgann,

Pe gallet kas da get ar re-mañ holl war un dro,
dre nerzh loened križ, pe hini ur setañs groñs.

10 Met o skeiñ outo tamm ha tamm e lezes lec'h
d'ar binijenn,

Daoust ne oa ket dianav dit e oa o fallagriezh
tra-natur dezho,

O drougiezh tra diouzh o gwad,
Ne c'hellfe biken o soñjoù kemman

11 Dre ma oant ul lignez milliget a-dal hec'h orin.

Ha n'eo ket kennebeut all dre aon rak unan bennak
Ez out bet trugarezus ouzh o fec'hedoù.

12 Rak piw a vefe evit lavarout dit : Petra 'c'h eus
graet ?

Piw a c'hellfe herzel ouzh da varnedigezh ?

Piw a c'hellfe da damall evit bezañ distrujet
ar broadoù ac'h eus krouet ?

Piw a zalc'ho dirazout evel dialour tud kablus ?

13 Nann, n'eus ket en diavaez dit un Doue
oc'h ober war-dro pep tra,

Ma lefes diskouez dezhañ n'eo ket direizh da setañs

14 N'eus roue na rener ebet a c'hellfe sevel ouzhit
evit difenn ar re a-gastizez.

15 Reizh maz out, e renez pep tra gant reizhder,

Hag e sellez evel tra dizereat ouzh da c'halloud,
Kondaoniñ an nep n'eo ket dleet dezhañ kastiz.

16 Da nerzh eo an hini a zo penn-abeg da justis,
Ha da vestroniezh war an traou
az laka da vezañ damantus outo.

17 Diskouez a rez da nerzh d'ar re na gredont ket
en da beurec'halloudegezh,

Hag e tivarc'hez an dud a ra fae outi,
goude m'hec'h anavont ;

18 Hogen, mestr maz out war da nerzh,
hon barnez gant douster

Hag e c'houarnes ac'hanomp gant kalz a drugarez,
Dre m'emañ bepred da c'halloud ganit,
prest d'ober diouzh da youl.

19 O vont evelse ganti ac'h eus desket d'az pobl
E tle an den just bezañ madelezhus,

Ha roet ac'h eus d'az mibion an esperañs dous
E levez goude ar pec'had, amzer evit ar glac'har.

20 Mar'd ac'h eus kastizet gant kement a arboell
hag a zamant

Enebourion da vugale, - ha goude ma oant gouestlet
d'ar maro -

Mar'd ac'h eus roet dezho amzer ha tu da zistreiñ
diouzh o drougiezh,

21 Na gant pebezh evezhiegezh ne varnez ket da vibion

Ac'h eus gratset d'o zadoù gant le douet ha feur-emgle
promesaoù ken kaer ?

22 Hon adreizhañ a rez, met skeiñ a rez

mil gwech muioc'h gant hon enebourion ,

Dimp da gaout soñj eus da vadelezh, pa varnomp,

Ha pa'z omp barnet, da gaout spi ez trugarez.

Goude habaskter e ra Doue gant garventez

23 Setu perak ivez ac'h eus bourreviet

gant o euzhusterioù o-unan

Ar re o deus bevet en diboell hag en direizh ;

24 Re bell evit gwir o devoa dihenchet

en gwenodennoù ar fazi

Betek sellout evel doueed an dismegusañ eus al loened,

Betek en em dromplañ evel bugaligoù hep skiant.

25 Setu perak, evel e-keñver bugale diboell,

Ac'h eus kaset dezho ur c'hastiz dister.

26 Met ar re ne oant ket bet adreizhet

gant ur seurt kemenn

O deus anavezet ur c'hastiz dellezek eus Doue.

27 Peurhegaset ma voent gant ar poanioù skoet outo

gant al loened-se o devoa kemeret evel doueed,

=====

23. O euzhusterioù o-unan, ger a dalv en Testamant Kozh
evit an doueoù-faos hag an idolennoù. Goude ur gammdro
diwar-benn Kanaan setu an oberour oc'h adkregiñ gant
an Ejipt da damall da Draonienn an Nil an azeulerezh-
loened.

1 loened-se hag a droe bremañ d'o bourreviañ,

weljont sklaer, ec'h anavjont

an hini o devoa nac'het e anzav, an Doue gwirion :

En abeg da se e plaozias warno ar c'hastiz diwezhañ.

Azeulerezh ar stered hag an nerzhioù-natur

13. 1 Ya, diboell a-grenn eo an holl dud a zo chomet

dic'houzvez eus Doue,

Ha n'int ket bet, dre sellout ouzh ar madoù gwelus,

evit anaout an Hini-a-zo,

Nag evit meizañ ar micherour diwar arvestiñ e oberoù.

2 Met an tan, an avel, an aer skañv,

Ar volz stergannek, an dour feulz, pe

flammerennoù an neñv,

Eo ar re o deus sellet evel doueed,

renerion an hollved.

3 Mar'd eo boemet gant o c'haerded o deus kemeret

an traou-se evit doueed,

Ra zeskind pegement eo o Mestr trec'h warno.

=====

25-26. Goude bezañ bet skoet dister gant gwalennoù a
c'helle o achantourion drevezañ anezho, e teuas war E-
jiptiz reuzioù brasoc'h, en doare ma voe ret da Faraon
anavezout enno galloud Doue. Met dre ma talc'he da chom
hep sentiñ, e voe ret da Zoue teurel outo betek ar
c'hastizadurioù garvañ, distruj ar re gentañ ganet ha
dismant an arme.

13. 1 "An Hini-a-zo": sell.ouzh Ermaeziadeg 3, 14.

Rak oberour ar gaerded eo an hini

en deus graet anezho.

4 Mar'd eo o nerzh hag o oberiantiz

ez int bet estlammet ganto,

Ra gomprenint diwarno pegen galloudusoc'h

eo an hini en deus o stummet ;

5 Rak diwar braster ha kaerder ar c'hrouadurioù,

E c'heller, dre zamheñvelidigezh, anavezout o c'hrou

6 Ar re-se koulskoude ne veritont moarvat

nemet ur rebech skañv,

Rak marteze ne zihenchant nemet o klask Doue

hag o vennout e gavout.

7 Bevañ ma reont e-kreiz e oberoù, e strivont

d'o furchal,

Hag e vezont lorbet gant spesoù an traou,

ken kaer maz eo ar pezh a welont.

8 Evelato, hel lavarout a ran c'hoazh,

ar re-se zoken n'int ket da zigareziñ :

Mar o deus gallet gounit gouiziegezh awalc'h

evit santeal an hollved,

Penaos n'o deus ket dizoloet kentoc'h

ar Mestr anezhañ ?

zeulerezh an Idolennou

10 Hogen reuzeudik, - esperiñ ma reont en traou maro -,

ar re o deus anvet doueed oberennoù diwar dorn an den,

four, pe arc'hant labouret gant arz, skeudennoù loened,

maen didalvoud benet gant un dorn a-wechall.

11 Setu m'en deus ur micherour diskaret ur wezenn

aes da droc'hañ :

Gant ampartiz en deus rasket diwarni an holl rusk,

Hag he stummañ a ra gant mailhoni

D'ober ur benveg servijus evit ar vuhez voutin.

12 Restachoù e labour, o implijout a ra

Da aozañ ar boued e vo torret e naon gantañ.

13 Chom a ra ur blod ha ne dalv da netra,

Un tamm prenn gwaret hag ulmennek ;

E gener a ra, e skultañ a ra en e eurioù vak,

E stummañ a ra gant e holl ampartiz a vicherour;

Reiñ a ra dezhañ neuz un den,

14 Pe stumm ul loen displed bennak ;

=====

10. An arguzerezh a-enep an idolouriezh a zo danvez boaz da levrioù ar Bibl ha da abostolerezh ar Yuzevion (sell. ouzh Barouk 6. Lizher Yheremia d'an harluidi; Diouganou sibillek, 3, 586-590). Amañ e seblant an oberour bezañ bet levezonet gant : Adlezenn 4,28 ; II Rouaned 19,18; Yheremia, 2,27-28; 10,3-5; ha dreist holl Isahia 40,18-20; 41,6-7; 44,9-20; 46,5-7.

Hag o lakaat warnañ ruz-tane da reiñ dezhañ liw tan,
E'kuzh e holl nammoù gant an indu.

15 Ober a ra neuze dezhañ ur chomlec'h a zoare ;

Hen lakaat a ra er voger ouzh e startaat gant un tach

16 Kemeret en deus an aked-se gant aon na gouezhfe ,

Rak gouzout a ra mat ne c'hell ket en em sikour :

Ned eo nemet ur skeudenn, skoazell he deus ezhomm.

17 Koulskoude, setu ma ped anezhañ evit e vadoù,

evit e zimezi, evit e vugale,

N'en deus ket mezh o komz ouzh un dra hep buhez.

Evit e yec'hed ec'h asped un dra dinerzh,

18 Evit e vuhez, un dra maro,

Evit e skoazellañ, un dra dic'halloud,

Evit e veajoù, ar pezh n'hall ket mont gant e dreid,

19 Evit e c'hoproù, e labourioù, evit dibenn-mat

embregadurioù e zaouarn,

E c'houlenn nerzh digant ar pezh n'en deus

en e zaouarn nerzh ebet !

14. 1 Ha sed un all a zo war nes mont war vor

Hag a venn treizañ an houl fero ;

Aspediñ a ra un tamm-koad breskoc'h c'hoazh

eget al lestr a zoug anezhañ kuit.

2 Al lestr-se, eo c'hoant ar gonid en deus hen ijinat,

Eo furnez ar vicher he deus hen savet ;

3 Met da rakwelerezh, o Tad !

eo an hini a vlegn anezhañ,

Te hag ac'h eus digoret un hent er mor zoken,

Ha war an tonnoù ur wenodenn asur ;

4 Diskouez a rez gant se e c'hellez diwall

diouzh pep riskl

An nep a ya war vor, zoken hep skiant-prenet.

5 Ne fell ket dit e chomfe displetus oberoù ar Furnez,

Ha setu perak e kred an dud fiziout o buhez

zoken en un tamm-koad dister,

Ha goude treizañ an houl war ur vag vresk,

douarañ disgwall.

6 Hag evit gwir, en amzerioù kent, e-pad ma kases

da get ar ramzed lorc'hus,

Ec'h en em repuas war ur vag, esperañs an hollved ;

Hag hi, bet bleniet gant da zorn, a lezas d'an douar

hadenn ur ouenn nevez.

7 Rak benniget eo ar c'hoad a servij d'ar reizhder ;

8 Milliget avat an idolenn, labour daouarn an den,

hi hag hec'h oberour,

Hemañ evit bezañ graet anezhi,

Hag honnezh, breinadus maz eo, dre ma vez anvet Doue.

=====

6. Ar ramzed lorc'hus, sell. ouzh Gen. 6,4. Ar ramzed-se a veze dalc'het ganto ul lec'h bras en hengounioù hag en mojennoù ar Yuzevion. Esperañs an hollved : Noe hag e dud o klask repu war an arc'h.

9 Hevelep kasoni en deus Doue ouzh an den direizh
 evel ouzh e zireizhder :
 Oberenn hag oberour a vo kastizet en hevelep doare.
 11 Setu perak e vo skoet gant ar varnedigezh
 idolennoù ar broadoù,
 O vezañ maz' int deuet en krouadelezh Doue
 da vezañ un euzhusted,
 Un droukskoilh evit eneoù an dud,
 Ur pech evit treid ar re ziboell.

Orin an idolazeulerezh

12 Kavadenñ an idolennoù a zo bet penn-orin
 ar c'hadaliez, h,
 O dizoloadenn he deus breinet ar vuhez.
 13 Ne oa ket anezho er penn kentañ,
 ha ne badint ket dalc'hmat ;
 14 Emlorc'h an dud eo an hini en deus roet
 dezho dor digor er bed ;
 Hag en abeg da se eo tonket dezho diwezh trumm.

15 Un tad mantret gant ur c'hañv araok-kouñz,
 En deus lakaet d'ober skeudenn e vogel

=====

12. Penn-orin ar c'hadaliez : moarvat ez eus da gompren amañ gadaliezh er ster a zisfealded ouzh Doue. Al liamm etre Doue hag e bobl o vezañ skeudennet dindan stumm un dimezi, ez eo pep disfealded ouzh an Aotrou un doare avoultriezh, orgederezh, gadaliezh.

skrapet re abred ;
 Hag an hini ne oa dec'h c'hoazh nemet un den maro,
 Hen enoriñ a ra bremañ evel un Doue
 O tiazekañ evit tud e di lidoù-kuzh ha misterioù.
 16 Gant an amzer e vez kreñvaet ar c'hustum disakr-se,
 Ha setu ma vez miret evel ul lezenn.
 17 Dre urzh ar briñsed eo ivez ma voe azeulet
 ar skeudennoù skultet :
 Ar re n'hellent ket bezañ enoret enno o-unan
 Dre ma oant re bell o chom.
 A voe lakaet da vezañ skeudennet o neuz,
 Ha gwelet e voe gant an dud poltred ar roue kehelet,
 Ha c'hellfent diskouez o doujañs gredus
 d'an ezveziad, evel pa vije aze.
 18 Ar pezh a labouras c'hoazh da astenn
 ur seurt kehelerezh
 oken e touez ar re n'anavezent ket ar Roue,
 A voe lorc'hentez an arzour :
 19 O c'hoantaat plijout d'ar Mestr
 E strivas en e arz d'ober kenedusoc'h
 eget ar patrom ;
 20 Hag an engroez, holet gant kaerder an oberenn,
 sellas evel un Doue, an hini azaouezet
 ergentaou evel un den .

21 Hag ur pech e voe evit ar re vev
Ma teuas an dud, dindan levezon ar gwalleur pe
galloud ar briñsed,
Da reiñ d'ar maen pe d'ar prenn an Ano digenlodennus.

An heuliadoù fall da azeulerezh an idolennoù

22 Hep dale ne voe ket awalc'h dezho dihenchañ
en anaoudegezh Doue ;
Daoust d'ar stourm garo ma oant splujet ennañ
gant o-diouiziegezh,
Setu-int o reiñ an ano a beoc'h da zrougoù ken bras !
23 Gant o sakrifisoù lazh-bugale, o misterioù kuzh,
O mezvadegoù, feuls hag iskis o lidoù,
24 Ne viront ken purentez ebet nag en o buhez,
nag er briedelezh ;
An eil a lazh egile dre dreitouriezh, pe a zismegañs
anezhañ gant an avoultriezh.
25 Dre holl, mesk ha mesk, gwad, muntrevezh,
laeroñsi ha trubardiezh,
Lorberezh, dislealded, dispac'h, fals-le,
26 Strafuilh ar re vat, ankounac'h ar madoberoù,
Saotridigezh an eneoù, dirollerezh enep-natur,

=====

21. An ano digenlodennus, da lavarout eo, ano Doue, na
c'hell bezañ roet da hini ebet estregetañ.
22. Peoc'h, dindan bluenn ur Yuzev, a dalv an eurvath
perc'henniezh ar madoù danvezel ha speredel.

Dizurzhioù en dimezi, avoultriezh, dizonestiz.
27 Rak azeulerezh an idolennoù goull
A zo penn-kentañ, penn-abeg ha diwezh pep gwall.
28 Pe en em ziduiñ a reont betek diskiantiñ,
Pe e tistagont diouganou faos,
Pe e vevont en direizhder,
Pe e torront diwar skañv o leoù.
29 O vezañ ma lakont o fiziañs en idolennoù divuhez,
Ne c'hortozont kastiz ebet evit o faosoni.
30 Ar c'hastiz koulskoude a skoio outo evit
an torfed doubl-mañ :
Azeulerion an idolennoù, n'o deus ket bet ur menoz
reizh eus Doue,
Ha trubarded maz int bet, o deus touet a-enep ar wirionez,
O tismegañsiñ ar pezh a zo santel.
31 Rak n'eo ket galloud an idolennoù pedet ganto
Met ar c'hastiz dleet d'ar bec'herion
A gouezh bepred war fallagriezh ar re zrouk.

Israhel n'eo ket idolazeuler

15. 1 Te avat, hon Doue, te 'zo madelezhus,
feal, hirc'hortozek,
Ha gouarn a rez pep tra gant trugarez.
2 Ha goude pec'hiñ ez omp bepred dit-te
dre mac'h anavezomp da c'halloud,

Levr ar Furnez : 15,2 -- 15,7

Hogen ne fell ket dimp pec'hiñ, o c'houzout
ez omp kontet e-touez da re.

3 Da anavout eo evit gwir ar reizhder klok,
Anavout da c'halloud eo gwrizienn an divarvelezh.

4 Nann, n'omp ket bet dihenchet gant kavadennoù
lorbus arz an den,

Na gant labourioù goullo al liverion,
An dremmoù-se bastrouilhet gant livioù digendoare

5 A hillig ar gwel anezho c'hoantegezhioù
ar re ziboell

Betek o lakaat da c'hoantaat neuz divuhez
ur skeudenn hep ene.

6 Karourion ar gwall, dellezek eus ar gwall,
Eo ar re a ra anezho, evel ar re a ziskouez dezho
karantez hag enor.

Sotoni oberourion an idolennoù

7 Setu eta ur poder o verat gant kalz labour,
an douar gwak,

Hag o stummañ dioutañ a bep seurt listri
evit hor servij ;

Eus an hevelep pri ec'h aoz ar podoù
gouestlet d'an implijoù noplañ,

Hag en hevelep doare, ar re tonket d'ar servijoù
kontrol

Met da behini eus an implijoù-se

Levr ar Furnez : 15,7 -- 15,12

e vo dileuriet pep unan ?

Ar poder eo an hini a ziviz kement-se.

8 Ha goude-se, en ul labour displetus ec'h aoz
eus an hevelep pri, un doue goullo,

Eñ hag a zo bet, n'eus ket pell c'hoazh,
ganet eus an douar,

Hag a dle distreiñ hep dale d'an douar-se
m'eo bet tennet dioutañ,

Pa vo goulennet outañ ar gont eus e vuhez.

9 N'en deus koulskoude nec'h ebet gant e varo war nes,
Na gant ar berr maz eo ar vuhez.

Pell a se : kevezañ a ra gant micherourion an aour
hag an arc'hant,

Drevezañ a ra boserion an arem ;
Lakaat a ra e glod da stummañ faosoni.

10 Ludu eo e galon !

Ha viloc'h eget fank, e spi !

Truekoc'h eget pri, e vuhez !

11 Rak n'anav ket an hini en deus e stummet,
An hini en deus c'hwezhet ennañ un ene oberiant
Ha roet dezhañ un alan a vuhez.

12 Muioc'h a se, ned eo hor buhez evitañ
nemet ur mibiliach,

Hon amzer amañ nemet ur fear-gonid :

"Ret eo, emezañ, tennañ hor mad eus pep tra,

zoken eus ar gwall ! "

13 Ya ! muioc'h eget ar re all, hennezh

a oar emañ o pec'hin,

Eñ hag a stumm eus an hevelep douar,

listri bresk ha war un dro, idolennoù.

Diboellegezh Ejiptiz : o idolouriezh vezhus.

14 Met diboellekoc'h c'hoazh, reuzeudikoc'h

eget ene ur bugelig

Ez eo enebourion da bobl, ar re-se holl

o deus mac'homet anezhi :

15 Rak sellet o deus evel doueed, holl idolennoù

ar broadoù

Na c'hellont implijout nag o daoulagad evit gwelout,

Nag o difronn evit alananat an aer,

Nag o diskouarn evit klevout,

Na bizied o daouarn evit stekiñ,

Nag o zroid evit kerzhout.

16 Rak un den eo an hini en deus graet anezho,

Unan amprestet dezhañ e anal en deus o stummet.

N'eus den ebet avat a c'hellfe aozañ un Doue

peurheñvel outañ e-unan,

17 Rak o vezañ marvel eo tra maro ar pezh

a ra e zaouarn.

=====

14. Reuzeudikoc'h eget ene ur bugelig : ur bugel a vez
tromplet aes meurbet, hag int aesoc'h c'hoazh.

Talvezout a ra muioc'h eget an traou azeulet gantañ,

Eñ hag en devo bet buhez da vihanañ, hag int morse !

18 Kenkoulz eo d'al loened ar c'hasaüsañ e rentont

azaouez,

D'ar re gwashoc'h eget ar re all gant o diboelegezh,

19 Ar re n'o deus enno netra kaer a c'hellfe dedennañ,

- Maz eus plijadur o welout loened 'zo -

Ar re a zo tec'het ermaez eus meulidigezh

ha bennozh Doue.

Eil kenveriadur etre an Ejipt hag Israhel : al loened

16. 1 Reizh eo eta mar'd int bet kastizet

gant anevaled a seurt-se,

Ha bourreviet gant loeniged e-leiz.

2 Met e-lec'h ar gwallennoù-se

ac'h eus graet vat d'az pobl,

Hag evit dinaoniañ hec'h ilboued broudus

Ac'h eus grataet dezhi d'he bevañ

Ur vagadurezh souezhus, - ar c'hoailhed ! -

3 An Ejiptiz, daoust d'o c'hoant-debriñ

=====

2. Sell. ouzh Ermaez. 16,9-13, ha Niveroù 11,10-32.
C'hoantek maz eo an oberour da veuliñ "ar bobl santel",
ne ra meneg ebet eus he grozmoloù nag eus konnar Doue
en hec'h enep.

3. Moarvat ar raned (Ermaez. 7,28-29; 8,2)

A golle zoken o ilboued naturel,
Pa welent neuzioù heugus al loened kaset en o enep.
Da bobl-te avat, goude bezañ bet en diouer ur pennadig,
A dañvaas magadurezh estlammus.

4 Ret e oa e kouezhfe war ar re gentañ,
War ar vac'homerion, dienez didruez :
Pa oa awalc'h evit ar re all diskouez dezho
penaos e oa bet bourreviet o enebourion.

5 Pa zeuas warno konnar euzhus loened garo,
Pa varvent diwar krog naered gwidilus,
Ne badas ket da gonnar betek ar penn.

6 Ma voent trubuilhet e-pad berr-amzer,
e oa e sell d'o addressañ ;
Rak ur sin a silvidigezh o devoa, a roe soñj dezho
eus gourc'hemenn da lezenn,

7 Hag an hini en em droe war-du ennañ
Ne oa ket salvet gant ar pezh a selle,
Met ganit-te, Salver an holl.

8 Diskouez a raes evelse d'hon enebourion
Eo te an hini a zieub diouzh pep gwall.

9 Rak int a varve dindan krog al lamperezed
hag ar c'helion
Hep kaout remed d'en em salviñ,
Dleet ma oa dezho bezañ kastizet
gant seurt loened.

10 Da vibion avat, zoken dont an naered binimus
n'e voent ket evito ,

Dre ma teuas da drugarez d'o skoazellañ ha d'o salviñ.

11 Flemmet e oant - ha pareet buan ! -

Evit m'o defe soñj eus da lavarou,
Gant aon ma zeufent d'o ankouaat da vat
Ha d'en em lakaat int o-unan ermaez eus da vadelezh.

12 Hag evit gwir, n'eo ket ul louzoù pe un traet
bennak a salvas anezho,

Met da lavar, Aotrou, da lavar a bare pep tra !

13 Rak te a zo mestr war ar vuhez hag ar maro,
Te a lak da ziskenn betek dor an Hades
hag a ro adsevel dioutañ.

14 An den en e fallagriezh a c'hell
moarvat reiñ ar maro,

Ne zegas ket endro ar c'hwezh ur wech aet kuit,
Ne zieub ket an ene bet resevet gant an Hades.

Trede kenveriadur etre An Ejipt hag Israhel :

Glaveier, Kazarc'h ha Tan

15 E-maez galloud da zorn n'heller ket tec'hout.

16 An dud disakr hag a nac'he da anavezout

A zo bet skourjezet gant nerzh da vrec'h,

=====

14. Doue a c'hell dasorc'hiñ endro ur c'horf maro (sell.
ouzh I Rouaned 17,17-23; II Rouaned 4,33-35; 13,21).

Arsailhet gant glaveier digustum,

kazarc'h, barradoù didruez,

Ha kuzumet gant an tan-foeltr.

17 Met ar pep souezhusañ a oa gwelout

Penaos, en dour hag a zistan pep tra,

E troe an tan da vezañ gwriziasoc'h.

An hollved, evit gwir, a stourm a-du gant ar re reizh.

18 Gwech e tave ar flamm

Evit na vefe ket dêvet al loened bet kaset

a-enep an dud disakr,

Hag evit ma komprenfent, o welout se,

e vezent heskinet gant barnedigezh Doue.

19 Gwech, e kreiz an dour e-unan, e veze kuzumet

pep tra gant nerzh kreñvoc'h eget an tan

Evit ma vije distrujet holl frouezhioù

un douar kablus.

20 Da bobl avat ac'h eus bevet gant

magadurezh an Aeled ;

Kaset ac'h eus dezhi hep skuizhañ, ur bara peuraozet,

Barrek da reiñ pep plijadurezh ha da

walc'hañ blizidigezh pep unan.

21 An danvez-se roet ganit a ziskoueze da zouster

e-keñver da vugale,

=====

20. Ar Mann, anvet bara an Aeled evel er psalm 77,2
(troidigezh an LXX) dre ma seblante diskenn eus an
neñv.

21. Ar Mann he devoa blaz ar mel (Ermaez. 16,31), pezh
a oa ur sin eus douster Doue. Ar gwerzad-mañ evel ar
amañ war-lerc'h a ziskouez penaos e oa bet kreske

Peogwir en em rae diouzh blizidigezh an hini hen debre

Ha na kemme hervez c'hoant pep unan.

22 Erc'h ha skorn, gouzañv a rae ar flamm hep teziñ,

Evit ma vefe gouvezet e oa hepken

evit distrujañ eostoù an enebourion

E tlee an tan devañ e-kreiz ar c'hazarc'h

ha skediñ e-kreiz ar glav,

23 E-pad ma ankouae e nerzh-natur

Pa oa d'ober eus bevañs ar re reizh.

24 Rak ar grouadelezh, sujet dit, he c'hrouer,

En em greñva evit kastizañ ar re fall,

Endra m'en em zistenn evit mad ar re

en em fiz ennout.

25 Setu perak o'n em blegañ da gemmadurioù a bep seurt

E teue da vezañ servijerez da vadelezh a vag pep tra,

Hag en em stumme diouzh c'hoant ar re a oa en ezhomm.

26 Evelse, Aotroù, da vugale garet a zeskfe

N'eo ket ar seurtoù frouezh disheñvel a vag an den,

Met da lavar, a vir ar re a gred ennout.

27 Rak ar pezh n'helle ket an tan kas anezhañ da get

A deuze diouzhtu dindan gwrez ur bann-heol berrbad,

28 Evit deskiñ d'an holl e tleer diaraogiñ an heol

=====

kalz gant faltazi ar Yuzevion an hengoun diwar-benn
magadurezh ar gouelec'h.

22. Erc'h ha skorn, a dalv amañ da envel ar Mann, a oa
mañval da welout ouzh frim pe erc'h kouezhet war an
douar. Amañ e lez da vat an oberour e faltazi da vont.

evit rentañ grasoù dit,

Ha da bediñ kerkent ha tarzha an deiz.

29 Goañag an den dic'hrad a deuz evel ur frim-goañv,

Evel un dour didalvez e tiver kuit.

Pevare keñveriadur : Teñvalijenn ha sklerijenn

17. 1 Ya, bras ha diveizus eo da varnedigezhioù ;

Ha neuze, an eneoù tuzum o deus faziet diwar o fenn.

2 Evit bezañ kredet e c'hellent moustrañ ar boblad

santel, int an dud disakr,

E oant gourvezet, toullbac'het, en deñvalijenn, chadenn

en un noz hirbad,

Serret dindan o zoennoù, forbannet diouzh da

ragevezh peurbadus.

3 O vezañ ma soñjent chom dianav en o fec'hedoù kuzh,

Dindan gouel deñval an ankounac'h,

E voent splujet en dic'houlou, taget

gant ur braouac'h euzhus,

Spontet holl gant tasmantoù.

=====

2. Forbannet diouzh... sell. ouzh 14,3. Reoù all a dro gant nebeutoc'h a wir : "O klask tec'hout diouzh da ragevezh dizehan". Gant an arroud-mañ hon eus ur meneg eus an navet gwalenn (Ermaez. 10,21-23), danevellet dimp gant darbaroù a bep seurt, levrioù ar Bibl, mojennoù yuzev, diskleriadurioù rabinek, faltazi hag evezhiadennoù an oberour. Gant se hon eus amañ ur skouer dispar eus ar Midrasch rabinek.

4 Rak an toull-kuzh ma'n em c'houdorent ennañ,

n'o diwalle ket diouzh an aon :

Trouzioù spouronnus a dregerne war o zro,

Ha spesoù kañvus, hurennek o neuz,

en em ziskoueze dezho.

5 Ne oa tan ebet evit o sklerijennañ,

Ha lugern splann ar stered

Ne oa ket evit goulaouiñ an noz euzhus-se.

6 Un dolzenn-flamm hepken, a-wechoù,

en em ziskoueze trumm dezho,

O'n em enaouiñ drezi hec'h-unan, braouac'hus ;

Hag en o efreiz, ur wech steuziet ar weledigezh,

E kavent spouronnusoc'h c'hoazh pezh o devoa spurmantet.

7 Ardoù an achantourion en em ziskoueze dic'halloud ;

O arvezioù a furnez a oa disklaeriet o falsentez.

8 Rak ar re en em fugee da c'hellout forbannañ

e-maez an eneoù klañv, ar spouron hag ar strafuilh,

A gouezhe klañv, int ivez, gant an hevelep aon diboell.

9 Zoken pa ne oa netra efreizus evit o spontañ,

E oant spouronnet gant al loened o tremen,

an nasred o fic'hañ.

Mervel a raent o kridiennañ gant ar spont,

Hag o nac'hañ sellout ouzh an aer-se n'hellomp

en doare ebet tremen hepdañ.

10 Rak ar fallagriezh o vezañ aonik ha laosk,

en em gondaon hi hec'h-unan ;

Enkrezet he c'houstiañs, emañ bepred o c'hortoz
eviti ar pep gwashañ.

11 Rak ned eo an aon netra all

Nemet an diouer eus skoazell an emsoñj ;

Seul nebeutoc'h ma konter war sikourioù,

Seul poaniosoc'h e kaver chom hep gouzout
an abeg eus enkrezioù an unan.

13 Int-i, e-pad an noz-se a zic'halloud

Deuet ermaez eus an Hades dic'halloudus,

E oant gourvezet en un hevelep mored,

14 Argaset a-wechoù gant tasmantoù euzhus,

Ha seizet gwechoù all en fallaenn o ene ;

Rak ur spouron trumm ha dic'hortozet

a oa diskennet warno .

15 Evelse, an nop a gouezhe aze, piw bennak e oa,

A chome peg ouzh an dachenn, serret

er prizon-se hep morailh.

16 Pe labourer douar, pe mesaer,

Pe micherour o plediñ e-unan-penn gant e labour,

An holl, sourprenet, a gouezhe dindan ar

ret didrec'hus,

Rak an holl a veze ereet gant an hevelep chadenn

a deñvalderioù.

17 An avel o c'hwitellat,

Kan hesonus an evned er barroù bodennek,

Trouz hiboudus an dour en kas e red,

Strak ar rec'hier o kouezhañ disac'het,

18 Redadenn diwelus loened o lammad,

Yudadennoù an anevaled ar gouesañ,

An heklev o tãston e kleuz ar menezioù,

Pep tra o leunie a spouron hag o seize.

19 Rak e-keit ma skede war ar bed a-bezh

ur sklerijenn splann

Ha ma c'helle an dud en em reiñ distrob d'o labourioù,

20 En em astenne warno-int hepken, un noz ponner,

Skeudenn an deñvalijenn miret dezho.

Ha c'hoazh muioc'h eget an deñvalijenn-se e oant

evito o-unan, ur bec'h hag ur samm.

18. 1 War da re santel, evelato, eo

sklerijenn leun a skede.

An Ejiptiz, pa glevent o mouezh hep gwelout o dremm,

A zisklerie anezho evurus dre na

c'houzañvent ket an hevelep enkrezioù.

2 Rentañ a raent grasoù dezho o vezañ n'o c'hastizent

ket, goude bezañ bet gwallgaset ganto,

Hag e c'houlennent pardon evit o eneberezh digar.

3 E-lec'h an teñvalderioù-se eo ur golonenn-flamm

a rojout d'az re-te,

=====

20. E oant evito-o-unan ur bec'h hag ur samm, rak ur
goustiañs karget a zo c'hoazh ponneroc'h eget pep reuz
diavaez.

Evit o bleniañ en o beaj dianavez,
Evel un heol dinoaz en o divroadeg klodus.

4 Hogen ar re gentañ a verite e vije

tennet ar sklerijenn diouto

Hag e vefent prizoniet en deñvalijenn,

Int hag o devoa dalc'het en ereoù da vugale-te,

Ar re a dlee drezo bezañ dastrewet er bed

sklerijenn divarvus al Lezenn.

Pempvet keñveriadur : an Ael distrujer

5 Peogwir o devoa divizet lazhañ bugaligoù ar sent,

Ha ne voe salvet nemet unan eus ar re

ginniget d'ar maro,

E tennjout diouto evit o c'hastizañ,

un niver bras eus o bugale,

Hag e lakjout anezho da vervel en bouilh ar c'hoummoù.

6 An noz-se a oa bet rakkemennet d'hon tadoù ;

=====

4. Ar re a dlee drezo... Diskleriadur eus roll holl -
vedel Israhel, hervez spered ar Brofeted: Isahia 9,1 ;
42,6; 49,6; 51,4-5; Mika 4,1-3; Yeremia 3,17; 16,19-21;
Habakouk 2,14; Sefania 2,11; 3,9-10; Zakaria 8,20-23;
Yona. Dindan ar gerioù "sklerijenn al Lezenn", e tleer
sur mat, kompren ar gwirionezioù a bep seurt degaset
gant an Testamant kozh a bezh.

6. Rakkemennet d'hon Tadoù gant Moizez a zegasas d'an
Hebreed urzhioù ha promesaoù Doue (Ermaeziadeg 11 ha
12).

Hag int o c'houzout peseurt promesaoù

o devoa kredet enno;

A oa leun o c'halon a surentez laouen.

7 Da bobl evelse a c'hortoze war un dro

Silvidigezh ar re reizh

ha kollidigezh hec'h enebourion ;

Rak endra ma kastizes hon dizarbennerion

E roes klod dimp-ni ouzh hon gervel etrezek ennout.

9 Bugale santel ar re reizh a ginnigas

e kuzh ur sakrifiks,

Hag a galon unvan e rejont an emglev doueel-mañ

E vefe madoù ha riskloù tra kumun kenetrezo ar sent ;

Ha war un dro e krogent dija

gant kantikoù sakr an Tadoù.

10 D'o mouezhioù e responte kriadennoù

boubouennus o enebourion,

A-gevret gant gouelvanoù ar re a leñve war o bugale.

11 Un hevelep kastiz a dizhe ar sklav hag ar mestr ;

An den eus ar bobl a c'houzañve kenkouls hag ar Roue ;

12 An holl o devoa en un hevelep doare tud varv

diniver bet skoet gant un hevelep tremenvan,

Ha ne oa ken awalc'h eus ar re vev evit o sebeliañ,

Rak en ur momed e oa bet distrujet

gwellañ dibab o gouenn.

Levr ar Furnez : 18,13 -- 18,19

13 Evelse, goude bezañ bet diskredik

en abeg d'o strobinoù,

Ec'h anzavjont dirak distruj o re gentañ-ganet,

E oa ar bobl-se, evit gwir, bugel Doue.

14 E-pad ma oa goloet pep tra gant ur sioulder don

Ha m'he devoa tizhet an noz, kreiz he redadenn herrus,

15 E kemeras e lañs eus lein an neñvoù, eus an

tron roueel, da lavar hollo'halloudek ;

Brezelour didruez e plaouias war an douar

gouestlet d'an distruj,

O tougen e giz kleze lemm, da ziviz didorru.

16 Hag o chom a sav, e leunias pep tra a varo.

Stekiñ a rae ouzh an neñv hag e voustre an douar.

17 War an taol, huñvreoù ha gweledigezhioù

euzhus a strafuilhas anezho,

Spouronoù dic'hortozet a gouezhas warno.

18 Taolet-distaolet d'an douar amañ

hag ahont, hanter-varo,

E roent da c'houzout an abeg eus o zremenvan ;

Rak an huñvreoù e oant bet gwallgaset ganto

O devoa diskuliet dezho ar perak eus o foanioù

=====

13. Bugel Doue, ger evit ger Mab da Zoue. Sell. ouzh Ermaeziadeg 4,22; Oseac'h 11,1; Yerima 31,20; Ester

16,15.

Levr ar Furnez : 18,19 -- 18,23

Evit na varvfent ket hep gouzout

perak e oant bet skoet.

20 Amprouenn ar maro, gwir eo, a dizhas

ivez koulskoude ar re reizh :

Un niver bras a dud a voe er gouelec'h skoet gantañ ;

Nemet ne badas ket pell konnar Doue.

21 Hastañ a reas un den direbech

da stourm 'vit o difenn :

Dre gemer armoù e vinistrerezh,

Pedenn ha sakrifis dic'haouüs an ezañs,

Ec'h enebas ouzh fulor Doue hag e lakaas

un termen d'ar walenn,

O tiskouez evelse e oa evit gwir da servijer-te.

22 Trec'hiñ a reas war ar gwall-reuz, met n'eo ket

gant nerzh ar c'horf,

Pe gant galloudegezh an armoù,

Hogen dre al lavar e teuas a-benn

eus an hini a gastize,

Dre enñvoriñ al leoù graet d'an Tadoù

hag an emglevioù divizet.

23 Endra m'en em vernie dija ar c'helanoù

an eil re war ar re all,

Enñ, oc'h en em lakaat da hanterour,

a harzas ouzh ar gonnar,

Hag a serras outi hent ar re vev.

24 Rak war e sae hir e oa skeudennet an hollved,
War ar peder rezad-mein e oa ingravet

anoioù klodus an Tadoù,

Ha war talgen e bonn, aroueziet da Veurded.

25 Dirak kement-se e kilas an Distrujer, spouronet,
Rak awalc'h e oa d'az fulor bezañ en em ziskouezet.

C'hwec'hvet keñveriadur : Ar Mor Ruz

19. 1 Met war ar re fallakr e pouezas

betek ar fin ur vrouez didruez,

Rak Doue a ouie en araok petra oa da c'hoarvezout

2 Ha penaos goude bezañ permetet dezho mont kuit,
Goude bezañ aspedet anezho da loc'hañ buan,

E tistrofent diwar o meno, hag ez afent war o lerc'h.

3 Dalc'het e oant bepred en o c'hañvoù

Hag e leñvent c'hoazh e-kichen bezioù o re varo,

Pa savas en o empenn ur mennad all a follentez,

Ha pa'n em lakjont da redek, evel pa vijent tec'hidi,

24. Evit sae ar Beleg-meur, sell.ouzh Ermaez.28,4 h.a.
Diwar-benn hec'h ornadurioù e roe ar Rabined displega-
durioù arouezel, o welout enno ur skeudennadur eus an
hollved. Anoioù klodus an Tadoù : war e vrennid e tou-
ge ar Beleg-meur daouzek maen priziuz, enskrivet warno
anoioù daouzek mab Yakob, tadoù an daouzek meuriad.
War e dalgen erfin, ul laonenn aour a zouge an enskri-
vadur-mañ : Santelezh Yaweh: sell.ouzh Ermaez.28,7-21,
29, 36.

War lerc'h ar re o devoa o aspedet da vont kuit.

4 Ur just a donkadur a vounte anezho betek ar gwashañ,

Hag o lakae da ankouaat an tremened,

Ma stagfent ouzh ar poanioù gouzañvet dija,

ar c'hastiz a vanke dezho c'hoazh,

5 Hag, e-keit ma tremenfe da bobl

en un dreizhadenn vurzhudus,

E kavfent-i ur maro digustum.

6 Rak evit diwall da vugale diouzh pep droug,

Ar grouadelezh a-bezh, sentus ouzh da urzhioù,

A voe adstummet en he natur.

7 Gwelet e voe ar c'hoabr o c'holeiñ ar c'hamp

gant o skeud,

Hag an douar start o'n em ziskouez e-maez

ar pezh a oa bet an dour,

Ar Mor Ruz o tont da vezañ un tremenlec'h dieub,

Ar c'houmoù taer o treiñ da gompezenn c'hlaizvezek ;

8 Ha poblad a-bezh ar re diwallet gant da Zorn

A dreizhas anezhi, oc'h arvestiñ burzhudoù eston.

9 Evel kezeg o peuriñ, evel oaned o lammad e oant,

Ha da veuliñ a raent, Aotroù, te, o dieuber.

10 Rak soñj o devoa eus ar pezh a oa bet tremenet

war an douar estren,

Penaos e oa bet ganet kelion eus an douar

ha n'eo ket eus al loened bev,

Penaos e lec'h pesked e oa bet dislonket
gant ar stêr, raned diniver.
11 Diwezhatoc'h e welljont c'hoazh evit an evned,
un doare nevez da c'henel,
En deiz ma savjont klemm, bountet gant ar c'hoantegezh,
da c'houlenn meuzioù milzin,
12 Ma teuas, evit o gwalc'hañ, koailhed eus ar mor.
13 Hogen war ar bec'herion, e p'laouias
ar c'hastizadurioù
A oa bet rakkemennet dezho gant kurunoù garo ;
Justis e oa pa c'houzañvent poan evit o zorfedoù,
14 Rak diskouezet o devoa gwashañ kasoni
e-keñver an estrenion :
Reoù all ne oa ket bet fellet dezho
resev tud n'anavezent ket,
Int avat o devoa lakaet dindan
sklavelezh ostizidi vadoberus.
15 Muic'h a se, ar re gentañ, - ya, sur mat
e vo dalc'het kont dezho eus an dra-se -

=====
14. Reoù all ne oa ket... ar gerioù-se a anv tud So-
dom o dije nac'het hervez soñj an oberour, resev an
Aeled-kannaded kaset dezho. Sell. ouzh Gen. 19. Gwa-
shoc'h eget Sodomiz sellet koulskoude evel an dorfe-
dourion vrasañ, eo c'hoazh Ejiptiz en dallentez o c'ha-
lon, p'o deus bourreviet an Hebreed goude ar servijoù
rentet gant Yosef.

Ar re gentañ o devoa diouzhtu diskouezet
digarantez e-keñver an estrenion ;
16 Int en enep, o devoa da gentañ degemeret
da bobl gant gouelioù ;
Met goude bezañ grataet d'az tud
perc'henniezh en o gwirioù,
o devoa bec'hiet anezho gant anerioù garo.
17 Setu perak e voe skoet dallentez outo,
Evel ma oa bet skoet ouzh ar re gentañ
dirak dorioù an den reizh,
Pa glaskent, gronnet a deñvalijenn don,
Adkavout pep unan dor-digor e di.

Klozadur


18 Evelse an elfennoù a eskemme o ferzhioù kenetrezo,
Evel war an delenn e kemm ar sonioù o mentadur
En ur virout o zoniezh.
Sed ar pezh a weler sklaer o sellout ouzh an darvoudoù :
19 Loened o vevañ war an douar a zeue da vezañ
loened-dour,
Hag ar re a neuñv en em ziskoueze war an douar.
20 An tan a greske en dour e nerzh-natur,
Hag an dour a ankouae e c'halloud lazhañ-tan.

=====
17. Sell.ouzh Gen. 19,11.

Levr ar Furnez : 19,21 -- 19,22

21 En enep da se, ne dizhe ken ar flammoù
Kig al loened, ken bresk koulskoude, o tremen enno.
Ne deuzent ket kennobeut all, ar boued neñvel-se
Heñvel ouzh ar frim, ha ken aes da deuziñ.

22 Ya, e pep tra, Aotrou, ac'h eus roet d'az pobl
braster ha klod,
N'ac'h eus ket he disprizet, met harpet ac'h eus anezhi
E pep mare hag e pep lec'h.



Liesskrivet e Ti Mari J.Moulin
22, straed Gurvan, 22
ROAZHON